

bremañ

H A Ñ V 9 4 • N I V E R E N N D O U B L



DIWAN
Emglev sinet gant ar Stad

DILENNADEGOU
disoc'hoù e Breizh

BREVED
Istor-Douaroniezh
e brezhoneg

**BREUDOU AR
BREZHONEG**
300 den e Pondivi

TEULIAD AR MIZ
Stad C'hall etre dezernh
ha rannvroioù

STAJOU HA DUDI
e-leizh !

POBLOU BERBER
E Gouel Sinema Douarnenez
21-28 a viz Eost



Deuet eo ar mare da gas ur chekenn deoc'h evit adkoumanantiñ evit 1994-1995. Ur bloaz zo dija e lennan ho kelaouenn : plijus-tre eo din. Ha, daoust ma n'on ket Breizhad tamm ebet, e vefen laouen -evel holl ho lennerien- ma c'hallfen kavout ur gelaouenn evel Bremañ bep pemzektez. Met ur pemdezieg ? Nann trugarez ! Amzer evit lenn ur pemdezieg hollvrezhonek n'am bije tamm ebet (Brezhonek mat a-walc'h n'eus ket c'hoazh ganin). War an tu all, ez eus bet kaoz war niverennoù diwezhañ Bremañ eus ur pemdezieg divyezhek : soñjal a ra din e vefe gwelloc'h evit an deraouidi evelidon. Hag evel ma lavar an Amerikaned : kement-se n'eo nemet ma "two cents" (80,02), d.l.e. nemet ma soñjoù. A wir galon,

Olivier Boulot
(Versailles-Frañs)

Karanteg, d'an 13 a viz Mezheven 1994

Itron Renerez,
Kevret e kavot va chekenn a 250 lur evit adkoumanantiñ da Vre-mañ.

Spi 'm eus e c'hello Bremañ bezañ embannet bep pemzektez. Degemer a ran hiziv (13/6/94) an niverenn 153 hoc'h eus lakaet e toull ar post d'ar 4/6/94. An harz-labour e Post Roazhon a zo abeg an dale-se moarvat, ma n'eo ket ivez war-un-dro kasoni ar fakteur du-mañ, enebet-krenn anezhañ ouzh ar brezhoneg...

Pezh a zo chalus : daou bennad a lennan en niverenn 153 diwar-benn al listenn "Peuples et Régions d'Europe" pa 'z eo c'hoarvezet dec'h ar mouezhiadegoù evit Europa.

Gant ur pemzektezieg e c'hellfemp taliñ gwelloc'h ouzh seurt degouezhoù.

A-galon ganeoc'h er stourm evit ar brezhoneg !

Iwan Guegan

Diskuilzhit mat e-pad ho vakañsoù !
Lennit Bremañ,
keleier e brezhoneg bep miz !

e gwerzh er stalioù levrinoù pe e-pad ar gouelioù.
Koumanant bloaz 200 lur, skouezell adalek 250 lur
Burev Bremañ 8, straed Hoche 35000 Roazhon.

DISTRO SKOL 94/95

Emañ Diwan o klask danvez-skolaerien evit kregiñ gant ar stummadur e miz Gwengolo 1994. Brezhoneg komzet. Live Aotregezh goulennet.

Skrivit pe bellgomzit da : Rann ar Stummañ-Diwan-Z.A. Sant Ernel
BP 156 29411 Landerne Cedex -
Pgz : 98 21 34 95

KELAOUENN
Breizh gant ar minitel

Keleier berr
Gouelioù ha festoù-noz
Stajoù - sonerezh, korall, brezhoneg
Chomlec'hioù, fikouroù o bep seurt
Levrioù nevez embannet
Skol Uhel ar Vro

Keleier
e brezhoneg
hag e galleg

Kasit keleier deomp :
☎ 99.87.69.12 • Faks 99.63.82.28

3615 KELA

E koun Per-Marie Lec'hvien

Ho pediñ a ran da zegemenn da lennerion ho kelaouenn e vo lidet evit ar beleg Per-Marie Lec'hvien, da-geñver 50vet deiz-ha-bloaz e varv truezus, un oferenn en iliz Santez-Anna, Pleraneg, e barrez c'henidik, d'ar Sul 7 a viz Eost da 10 eur 30. Trugarez deoc'h.

Job Lec'hvien
person Kergrist-Moelou



MOUTIG - Skol An Emsav Kerne-Izel -
16, straed Paul Borossi - 29000 Kemper
☎ 98 55 76 16

Kinnig-labour

Emañ Skol-Uhel ar Vro o klask unan bennak da labourat e Servij ar Brezhoneg, leun-amzer, adalek miz Gwengolo 1994.

Al labour : kemer e karg labourioù TermBret, Kreizenn Dermenadurezh evit ar Brezhoneg, Kenurzhiañ labour ar bodadoù dre zanvez.

Barregezhioù ret

- * Live aotregezh vrezhonek
- * Gouzout mat meur a yezh (Mat e vo gouzout kembraeg, ret e vo gouzout saozneg).
- * Gouzout skrivezañ
- * Bezañ gouest d'ober gant un urzhiaer

Kas ur C.V. hag ul lizher en em ginnig da Skol-Uhel ar Vro, 74 F, straed Pariz, BP 3166, 35031 Roazhon cedex.

Post C.E.S.

Emglev Bro an Oriant, kevredigezh Bro an Oriant, a glask un den evit kas buhez e-barzh metoù ar skolioù (animatouriezh) a-benn an distro-skol a zeu.

Bez' e ranko anavezout mat dañsoù hengounel Breizh, kaout anaoudegezhioù war gan ha sonerezh Breizh a vefe un dra vat ouzhpenn.

Ar post "Contrat Emploi Solidarité"-mañ a zo evit an distro-skol. Kasit ho lizher emginnig hag ho curriculum vitae da :

Emglev bro an Oriant, Ti ar C'hevredadoù, 12 straed Colbert 56100 an Oriant. ☎ 97 21 37 05.


**Kit da vakañsiñ gant MOUTIG !
Koumanantiñ buan !**

PETRA EO ? Ur gelaouenn leun a fent, a liv, a c'hoarioù, a istorioù eus ar re blijsañ !
Posubl eo ivez gourc'hemenn albom ar bloavezh (12 niverenn 1993 : 100 lur an tamm + 30 lur mizoù kas).

Na c'hortozit ket pelloc'h evit lenn 24 pajennad e liv ! Bihan ha bras vo plijet da sevel ar c'hoari-mañ-c'hoari pe da fardañ boued lipous e-pad ar vakañsoù !

220 lur ar c'houmanant evit 12 niverenn ar bloaz.

UNVANIEZH AR GELENNERIEH BREZHONEG, DIWAN, APEEB, DIHUN, DAZONT
BREZHONEG ER SKOLIOU



Tremen 1000 den o doa kemeret perzh er vanifestadeg kenaozet gant ar c'hevredigezhioù Diwan, A.P.E.E.B., Dihun, Unvaniezh ar Geleannerien Brezhoneg ha Dazont d'ar sadorn 11 a viz Mezheven e Roazhon.

Manifestet o doa "evit ar brezhoneg er skolioù", o c'houlenn, mesk-ha-mesk, ma vefe kavet un diskoulm reizh da gudennoù Diwan, ma vefe kaset war-raok ar c'hlasoù divyezhek, er skolioù Diwan, er skolioù Stad

hag er skolioù katolik e Breizh a-bezh, ma vefe stummet skolaerien ha keleannerien evit ar c'hlasoù-se, ha ma vefe krouet ur gwir CAPES brezhoneg gant postoù a-walc'h...! Daoust ma oa unvanet kevredigezhioù disheñvel

ha daoust ma oa meur a lugañ-goulenn gant ar vanifestadeg, ne voe ket ken niverus ar vaniferterien eget er manifestadegoù aozet gant Diwan hepken e Roazhon hag e Sant-Brieg er mizioù tremenet !



un emvod kelaouiñ oa bet e penn kentañ an enderezh gant dileuridi APEEB, DIHUN, DIWAN, DAZONT, U.G.B. e ti Skol An Emsav e Roazhon gant kelaouennerien hag animatourien radio.

RADIO BREIZH IZEL

Echu e amzer gant Sten Charbonneau

Abae ar c'hentañ a viz Gouere n'emañ ket mui Sten Charbonneau oc'h ober war-dro an abadenñ vrezhonek pemdezhek "Ar Seizh Amzer". Daoust ma voe nac'het gant Renerezh Labour Departamant Penn-ar-Bed ma vefe skarzhet Sten Charbonneau eus Radio Breizh Izel, en abeg ma ne oa bet kavet tra ebet da rebech outañ e-pad bloavezhioù, ha ma oa deuet e labour da vezañ unan hirbad evit gwir, en deus kavet gwelloc'h animatour "Ar Seizh Amzer" mont kuit d'ar mare ma echue e gevrat gant R.B.I.. Re start e vefe bet evitañ kenderc'hel da labourat dindan ur rener en doa klasket skarzhañ anezhañ. Hervez a lavarer, e vefe displijet-tre



Sten Charbonneau ouz ar mikro gant kelennerien ha skoliou Diwan

Renerezh Radio-France gant an doare ma voe meret an afer-se gant Herve Debois, rener Radio-France-Bretagne-Ouest, pa dennas war e gein enebiezh a-berzh sindikadoù CGT ha CFTD implijidi R.B.O., a-berzh kalz kevredigezhioù sevenadurel breizhek, a-berzh ur strollad kanerien ha sonerien savet evit an degouezh dindan an anv "Selaouit Mat" a zastumas kantadoù a sinadurioù a-du gant Sten Charbonneau en un nebeud sizhunvezhoù... Klaouste e vo c'henchet rener dizale e Radio-Breizh-Izel ■

CHADENNOU AR VRO

D'ar sul 5 a viz Mezheven, en abeg da Dournamant tennis Rolland-Garros, e Pariz, ne voe ket skignet abadenñ vrezhonek France 3 Ouest, "Chadenn ar Vro".



bremañ 154/155 - miz Gouere/Eost

Hep goullenn ali an arvesterien, nag hini renerezh France 3 Ouest, e tivizas renerezh France 3 e Pariz skignañ war-eeun ur match tennis d'an eur ma oa "Chadenn ar Vro" da vezañ skignet. Ha lamet kuit an abadenñ vrezhonek nemeti a weler e Breizh a-bezh ur wech ar sizhun.

"Fae a vez graet warnomp" a lavaras Stourm ar Brezhoneg a aozas ur vanifestadeg vihan dirak savadur France 3 e Roazhon d'ar sadorn 11 a viz Mezheven ma voe erret gant chadennoù porrastelloù ar gompagnunezh skinwel-se.

Abae ar c'hentañ a viz Gouere ne vez ket skignet a abadennoù brezhonek ken gant France 3. Tamm "Taol Lagad" (keleier pemdezhek) ebet evit arvesterien France 3 Iroise e kornog ar vro, ha tamm "Chadenn ar Vro" ebet evit annezidi peurrest Breizh. E miz Eost, a-hervez, e adkrogo "Chadenn ar Vro". Ret e vo gortoz miz Gwengolo avat evit kaout keleier an "Taol Lagad". Keleier fresk... ■

KORNIG AR GALLEG

Kaset he deus Unvaniezh ar Celennerien Brezhoneg ur gemennadenn c'hallek diwar-benn ar brezhoneg e skolioù katolik ar Mor-Bihan...

DIWAN

Asantet o deus ar skolioù Diwan an emglev a veze kinniget dezho gant Ministr an Deskadurezh Bayrou.



François Bayrou Ministr an Deskadurezh

Goude an emglev-se, bet degemeret gant Kendalc'h Diwan e miz Mezheven ha sinet e penn kentañ miz Gouere gant dileuridi Diwan ha dileuridi ar Ministrerezh, e vo paeet goprou ur 65 bennak a skolaerien ha kelennerien gant ar Stad-gouezet e vo an niver resis goude an distro-skol-, digoret e vo eilvet klas Diwan er Releg-Kerhuon e miz Gwengolo, hogen evit eil skolioù Diwan e Bro Dreger e vo ret gortoz Gwengolo 1995. ■

BREVED E BREZHONEG

Evit ar wech kentañ ez eus bet roet aotre da vugale skolek e brezhoneg da dremen arnodennoù ofisiel e brezhoneg. D'ar Meurzh 28 a viz Mezheven e embannas Ministrerezh an Deskadurezh e Pariz e oa tu da respont e "yezhoù rannvro" da c'houlennou an arnodennoù istor ha douaroniezh e "Brevet ar Skolajoù". D'ar Merc'her 29 a viz Mezheven e voe 17 skoliad eus Skolaj Diwan er Releg, hag 8 skoliad eus Skolaj Publik "Charles Le Goffic" e Lannuon, hag 1 skoliad eus Skolaj Publik Zola e Roazhon, o tremen o arnodennoù e brezhoneg eta. Fellout a ra bremañ o zud hag o c'helennerien ma vo astennet an aotre-se da zanveziou all er bloaz a zeu ■

SKOLIOU KATOLIK

Fellout a ra da bennoù bras ar Skolioù Katolik, e departamant ar Mor-Bihan, kas ar c'helenn brezhoneg war-raok. Broudet gant ar gevredigezh Dihun, emañ Renerezh ar Skolioù Katolik er Morbihan o vont da zigeriñ pemp klas divyezhek brezhoneg-galleg e miz Gwengolo. Stumman un tri-c'hant a skolaerien e-kerzh an tri bloaz zo o tont eo o fal, skolaerien a c'hello diouzh an dro ober skol e klasoù divyezhek pe kelenn brezhoneg e klasoù gallek. Lakaet e vo ar pouez war ar stumman hag ar peurl-stumman skolaerien adalek bremañ, o kinnig stajoù hir

(c'hwezek sizhunvezh en holl er bloaz a zeu), muioc'h a gentelioù brezhoneg e bloavezh kentañ hag en eil bloavezh an DEUG en Ardon. "Evit ma ne chamef ket ar skolioù katolik war-lerc'h ar skolioù publik hag ar skolioù Diwan" eme pennoù bras ar skolioù kristen er Mor-Bihan. ■

TOULL-BAC'H

Abae un nebeud sizhunvezhoù emañ Olazabal Eceiza Imanol, un Euskarak repuet e Karaez, "Imanol" evit e vignonet a Vreizh, en toull-bac'h e Pariz, goude ma oa bet harzet e Hanternoz Euskadi. En toull-bac'h emañ ivez ar Breizhad Kristen Tonnelle, eus Loudieg, a oa bet harzet a-gevret gant un toullad tud eus Kreizenn Sevenadurel Karaez, a voe lezet da vont buan a-walc'h gant ar polis.

Skrivit dezho : Olazabal Eceiza Imanol, 257644 Y, Cellule D318, 42 Rue de la Santé, Paris. (e galleg, spagnoleg pe euskareg). Kristen Tonnelle, 257642 W, Cellule A313, 42 rue de la Santé, Paris. (e brezhoneg, galleg pe saozneg) ■

TOUBON E BREIZH

Deuet e oa Jacques Toubon, Ministr gall ar Sevenadur hag ar "Frankofoniezh", da Wengamp e dibenn miz Mezheven da zigeriñ ur greizenn sevenadurel eno. Goullennet o doa kevredigezhioù sevenadurel ar c'horn-bro-se, en o zouez, Kreizenn

Sevenadurel Roparz Hemon, Skol Diwan Gwengamp, Stourm ar Brezhoneg, Radio Kreiz Breizh, skol an Hanternoz... bezañ degemeret gant ar Ministr. Ha tuvezet en doa hemañ o gwelet d'ar Sul 26 da 8 eur diouzh ar mintin. Pouezet o doa Andreu Lavanant ha Laorañs Guillaumie, eus Diwan, war Jacques Toubon evit ma pouezfe d'e dro war e genministr François Bayrou abenn lakaat digeriñ skolioù Diwan Plijidi e miz Gwengolo 94. A-du emañ kumun Plijidi hag ar c'humnioù all tro-dro ha Kuzul Departamant Aodoù-an-Arvor da lakaat ar c'hant er raktres-se evit ma vo degemeret 15 bugel en ur c'hwech'het klas nevez e Bro-Dreger. Ne vankfe ket kalz a dra, daou gevrat kelenner, eme dileuridi Diwan evit ma vefe digoret ar skolaer-se.

En anv ar c'hvedredigezhioù all o doa goullennet bezañ degemeret gant J. Toubon - Kreizhoneg, Roparz Hemon, Stourm ar Brezhoneg, Radio Kreiz Breizh... - o doa Fulup Kadored hag Herve ar Beg lakaet ar gaoz war krafoù all pouezus evit amzer da zont ar brezhoneg : Karta Europat ar Yezhoù, dinaç'het gant Bro-C'hall, plas ar brezhoneg er skingomz hag er skinwel, plas ar brezhoneg war ribl an hentoù Stad... Mut pe dispis-kenañ e oa chomet ar Ministr war ar goullennou-se o lavaret e oa ar gouarnamant o studiañ Karta Europat ar Yezhoù... ■

VOTADEG EUROPA

Kreizennerzh ha diviz e-biou

N'eo ket ar votadegoù evit dilenn kannaded Parlamant Europa an 12 a viz Mezheven a ziskouezo petra eo soñj ar Vretoned hervez Michel Nicolas, kelenner e Skol-Veur Breizh-Uhel hag enklaskour war ar bolitikouriezh. Gwariet eo bet an disoc'hoù gant tabutoù diabarzh ar stadoù, dreist-holl e Bro-C'hall. Listenn Simeoni evit pobloù ar c'hwec'hkorn n'eo ket bet klevet a-dreuz safar ar mediaoù.

Votadeg an 12 a viz Mezheven a ginnige da Europiz un degouezh arouezel, strategel ha pleustrek. 50 vloaz goude diskar ar faskouriezh o tiskouez ur vuhez demokratel boutin. O sevel un Europa demokratel a-us d'ar stadoù koshaet. O lakaat ar goulen war stumm ar gevredelouriezh : etre stadoù pe rannvroioù ?

E gwirionez, n'eus bet nemet brezelioù diabarzh etre tud pe strolladoù. Chom a raio ez eo bet trec'h et John Major ha Felipe Gonzalez, pe c'hoazh ez eo bet trec'h Helmut Kohl en tu all d'ar Roen.

Met e Bro-C'hall eo ez eo bet ar brasañ ar foz etre tachenn ar votadeg ha danvez ar tabutoù. Abaoe 1962 ez eo kreizennet buhez politikel ar Frañs en-dro da zibab ar prezidant. Gant an degouezh a-vremañ a c'hellfe adlakaat ur gaolour da brezidant evit ar wech kentañ abaoe 20 vloaz 'h eo bet kaset kudennoù Europa da dost netra.

TROCHET ETRE DAOU

Enkadenn ar strolladoù politikel, hep palioù nag ideologiezh sklaer, he deus diñchet muioc'h c'hoazh ar voterien. Ar re-mañ n'int mui nemet arvesterien pezhioù-c'hoari roet ton dezho gant mediaoù bras Paris. Gant ar mediaoù-se eo bet kaset war-raok Tapie ha de Villiers. Sikouret ha kaset d'an traoñ inteletualek parizian listenn Sarajev.

Etre div lodenn eo trec'h et ar Frañs : Paris diouzh un tu. Ar "brouiñs", e diavaez ar jeu diouzh un tu all.

Diaes gouzout piv zo bet trec'h. Ar rannvroioù avat zo bet koll, pa ne oa ket bet tu da lakaat an diviz diwar o fenn kennebeut, nag e 1986 (stag ouzh votadeg parlamant

1- *stabil e chom ar pennoù pellañ* : ar P.C.F. a bak 5,1% e 1994 evit 5,2% e 1989. Chom a ra kreñven e bastelloù : Plistin, Plouared, Benac'h, Gwengamp, Karaez, Huelgoat, Rostren, Sant-Nazer. Ar Front National a ziskenn un nebeud eus 7,6% e 1989 da 6,2% : kevezerezh de Villiers moarvat.

	Nann Voterien	P.C.F.	P.S.	Tapie	Ekolo	U.D.F./R.P.R.	De Villiers	F.N.	Europa Poblou
Aodoù Arvor	44,3	9	18,1	10	5	27,4	10,6	5,4	1,07
Penn ar Bed	49,1	5,2	18,6	7,6	4,9	30,8	12,6	6,3	1,34
Il ha Gwilen	48,3	3,1	16,8	9,8	6,1	30,3	12,6	5,4	0,79
Liger Atl.	48,3	4,3	17,7	8,4	5,2	25,1	17,1	6,1	0,56
Mor bihan	46,8	4,8	14,5	8,2	4,6	29,2	13,2	8,2	1
BREIZH	47,6	5,1	17,2	8,7	5,2	28,4	13,6	6,2	0,92
FRAÑS	47,2	6,8	14,4	12	4,5	25,5	12,3	10,5	0,39
Diforc'h etre BZH & Frañs	+0,4	-1,7	+2,8	-3,3	+0,7	+3,1	+1,3	-4,3	+0,43


Bro-C'hall) nag e 1992 (votadegoù kanton gant hini ar rannvro).

N'eo ket evel-se, eta, e vo tu da vuzuliañ soñjoù ar Vretoned. Taolenn disoc'h ar votadeg e Breizh

Pemp kentel a c'heller tennañ o keñveriañ votadeg 1994 gant reoù 1989. Heñvel e oa an doare da votiñ, ha tost a-walc'h niver ar vouezhierien : 216 051 e 1989 ha 218 165 e 1994.

2- *derc'hel a ra gwelloc'h ar strolladoù bras e Breizh* : ar P.S. a goll 8,1 poent, met ur poent nebeutoc'h eget e Bro-C'hall. Al listenn RPR/UDF gant Baudis a chom war live hini Giscard : 30,9% e 1989 ha 28,4% e 1994.

3- *diskar an ekolojisted* : kaletoc'h eget e Bro-C'hall eo c'hwitadenn an ekolojisted (Glas ha Génération Ecologie) : 12,2% e Breizh e 1989 ha 5,2% hepken e 1994 o sammañ



mouezhioù an daou strollad. 1 poent nebeutoc'h eget e Bro-C'hall a zo bet kollet ganto (-7 poent).

4- *Disoc'hoù disheñvel Tapie ha de Villiers* : Tapie a c'hounez nebeutoc'h e Breizh eget e Bro-C'hall : 8,7% e lec'h 12%. Met e korn-bro Pleven (Dinan) hag Ollivro (Gwengamp) ez eus bet adsavet ur vot radikal.

De Villiers, eñ, a ya en tu-hont d'an disoc'hoù e Bro-C'hall : +1,3 poent gant 13,6%, met a-drugarez d'al Liger-Atlantel (17,1%) ha dreist-holl gevred an departamant, korn-bro mirour tost eus ar Vendée.

5- *Disoc'h dister ar vot rannvroelour ha kevredelour* : 0,39% zo aet gant al listenn "rannvroioù ha pobloù kengred" e Frañs. Met, daoust d'an diouer a gendiviz eo bet niverusoc'h ar mouezhioù er rannvroioù dezho

ur bersonelezh kreñv : 10,9% e Korsika, 3,20% en Euskadi, 0,92% e Breizh a-bezh (1,06% er 4 departamant), 0,64% e Bro Elzas.

Dre an niver eo e Breizh ez eus bet ar muiañ a vouezhioù evit Simeoni : 12 934 mouezh evit 7 289 e Korsika ha 3 655 e Bro Euskadi.

E Liger-Atlantel eo kreñvoc'h an disoc'h (0,56%) eget e departamantoù all ar Pays-de-Loire (etre 0,36 ha 0,26%).

de Villiers, Le Pen ha Pêche - Chasse - Nature).

Chom a ra ar Vretoned gant o dibab war Europa peogwir e ya 60% eus ar mouezhioù gant strolladoù a zifenn feur-emglev Maastricht ■


Tangi Louarn

Diwar ur pennad savet gant Michel Nicolas, kelenner Skol-Veur Breizh-Uhel

LEVEZON AR YEZH

Spenn eo ivez ez eo kalz uheloc'h feur ar mouezhioù evit Simeoni e Breizh-Izel hag e heuilh al levezon-se bevrenn ar yezh eus Plouc'ha da ledenez Rewiz, evel m' en diskouez ar gartenn.

Da glozañ, ne verzer ket emdroadurioù bras e Breizh, nemet un tammig el Liger-Atlantel e-lec'h ma kresk ar vot mirour (28% gant



Politikerezh

Breujoù Europa

AR MOUEZHIADegoU E STAD SPAGN

Ledan-tre e oa an dibab strolladoù evit mouezhiadegoù Europa e Stad Spagn ar bloaz-mañ. D'an 12 a Vezheven e oa bet ret d'an 51,76% eus an dud na oa ket aet d'an aod dibab etre tost 30 strollad disheñvel

Ouzhpenn an tri strollad bras, PP (tu dehoù), PSOE (sokialour) hag IU, (unvaniezh an tu kleiz) e oa en o zouez pevar strollad faskour (Falañ ha "karfourien"), tri strollad komunour trotskour, daou strollad ekologour (Strollad ar Re C'hlas ha Re C'hlas Katalonia) ha strolladoù dianav pe istrogetlled evel Strollad Lezenn an Natur, ha Strollad ar Yonez hag an Hevoud. Met ret eo anv e oa ar braz eus ar strolladoù strolladoù broadelour pe rannbarzhour gant 10 strollad en holl : BNG (Talbenn Broadel Galisia), HB (Pobl Unvan - Euskadi), PREX (Strollad Rannbarzhour Ekstremadur), PAS (Strollad Asturianat), CAPA (Strollad Andaluzia), PREPAL (Strollad Rannbarzhour Leon), URCL (Unvaniezh Rannbarzhour Kastilha ha Leon) h.a.

Ne oa ket bet diaes divinout en ar-
raok gant piv ez afe ar maout : gant
ar PP ez eo kresket o zregantad eus
ar mouezhiou gant 18,80%
ouzhpenn e-keñver mouezhiadegoù
Europa e 1989. Gounezet eo bet
gant 28 kannad (+13) ha 40,21%
eus ar mouezhiou. Souezhus eo
avat n'eo ket diskennet muioc'h ar
PSOE rak n'eo deus kollet nemet
2,90% eus ar mouezhiou e-keñver
1989. Derc'hel a reont 22 kannad (-
5) memestra. Met n'eo deus an dud
fiziañs ebet ken er PSOE evel ma
tiskouez ar sifroù evit Andaluzia,
kreñvlec'h hengounel ar PSOE : eno
o deus kollet 17 kannad o
keñveriañ gant an 62 kannad o doa
bet e 1989. Ur c'hastiz kreñv eo bet
evit ar gouarnamant.

Aet war-raok eo IU (Unvaniezh an tu
kleiz) ivez gant 13,46% (+7,45%)
eus ar mouezhiou ha 9 kannad en
holl (+5). Roet eo bet kalz eus
mouezhiou ar PSOE dezhe moarvat.

Kollet eo bet o c'hannad e Brusel
gant Herri Batasuna avat ha
diskennet un tammig o zregantad

eus ar mouezhiou - e 1989 o doa
bet 1,70% ha koulskoude n'int
deuet a-benn da dapout nemet
0,97% ar bloaz-mañ. Soñjal a reer o
deus kollet kalzig a vouezhiou e
Katalonia an abeg da walldaolioù
ETA a zo bet eno.

E Galisia eo bet heugus an traoù
evel boaz rak ouzhpenn an hanter
eus ar mouezhiou a zo bet roet d'ar
PP (14,67% uheloc'h eget live ar
stad) ha manet eo ar PSOE en eil
renk gant 24,39% nemetken.

En em lakaet a-du e reas ar PP hag
ar PSOE e Galisia a-raok an
dilennadegoù evit mirout ouz ar
BNG (Talbenn Broadel Galisia) da
zont war-wel nag er skinwel nag er
c'helaouennoù er Rannbarzh - ur
gwir gaeladur eo bet. Met en
desped da se ha d'ar
"chasikouriezh" kreñv ez eo deuet
a-benn ar BNG da dapout 11,51%
eus ar mouezhiou e Galisia, da lâret
eo 7,33% muioc'h eget e 1989. War-
lerc'h an dilennadegoù avat ez
embannas ar c'helaouennoù ez eo
diskennet kalz dregantad ar
vroadelourien dre gefveriañ ouz
dilennadegoù ar Rannbarzh ar
bloaz-mañ.

Un disoc'h mat-tre eo bet evit ar
vroadelourien neuze daoust ma
n'int ket deuet a-benn da lakaat o
c'hannad e Brusel.

Tapet eo bet / sez gant ar Yuzh
Broadelour, ennañ ar PNV, da lâret
eo ur sez ouzhpenn gant 2,80%
(+0,89) eus ar mouezhiou.

Sklaer a-walc'h eo an traoù evit Stad
Spagn neuze : mont war-raok a ra
ar PP ha sur int da gaout ar galloud
e Breujoù Spagn pa zeuio ar
mouezhiadegoù stad ; diskenn a ra
ar PSOE met nebeutoch eget ma
c'heller krediñ emichañs rak aon
eus kresk an tu dehoù ha diouzh an
tu all e pign buan a-walc'h ar
strolladoù broadelour a bep seurt
dre holl. Setu penaos emañ an
traoù betek-hen evit Europa dre
vras :

sokialourien 195 sez (-3), tu dehoù-
mirourien 152 sez (-10), tu dehoù
pellañ 24 sez (+3) ha Kanevedenn 8
sez (-5) ■

Robert Baxter
(Sant Jakez, Galisia)

Keltia tramor

BRO-SKOS


En dilennadegoù evit Parlamant
Europa, en doa Strollad Broadel
Bro-Skos, ar "Scottish National
Party", tapet 33% eus ar
mouezhiou, an dregantad
gwellañ tizhet ganto abaoe
bloavezhioù, a ra anezho eil
strollad Bro-Skos. Pep a sez a voe
gounezet ganto e div bastell-vro,
"Inizi hag Uheldirioù" ha "Biz Bro-
Skos". Er c'hwech pastell-vro all a
Vro-Skos eo un den eus Strollad
al Labour a voe dilennet, hogen
da eil e oa an S.N.P. e pemp
anezho.

KEMBRE

E Kembre ivez o deus graet ar
vroadelourien araokadennoù bras
abaoe dilennadegoù 1989. En
"Hanternoz Kembre" e voe 34%
eus an dud o vouezhiañ evit Plaid
Cymru, e "Kornog Kembre" 25%
eus ar vouezhierien a reas, hag e
Kembre a-bezh ez eas 17% eus ar
mouezhiou gant ar strollad
broadel. Pemp kannad eus
Strollad al Labour a vo en anv
Kembreiz e Parlamant Europa,
hogen eil strollad politikel ar vro
eo Plaid Cymru pelloc'h, pa ne
voe nemet 15% eus an dud o
votiñ evit ar Virourien ha 9%
anezho evit ar Frankizourien.

KERNEV-VEUR

E pastell-vro "Kernev-Veur ha
Kornog Plymouth" ma kaver enni
korn-bro Plymouth a-gevret gant
Kernev-Veur, e oa ur vaouez war
ar renk en anv Mebyon Kernow,
ar strollad broadel kernev. 3315
mouezh a yeas gant
Loveday Jenkin, da lavaret eo
1,5% eus an holl vouezhiou
eztaolet er bastell-vro-se zo
brasoc'h eget Kernev-Veur.



Breujoù Pondivi

AR BREZHONEG ER SKOLIOU

**Tost da 300 den o deus
kemeret perzh e
Breujoù Pondivi "ar
brezhoneg hag ar
skolioù" d'ar 25 ha d'ar
26 a viz Even. En o
zouez dilennidi,
skolaerien, tud ar
vugale... hag a zo en
em lakaet da vat da
labourat asambles evit
kas ar brezhoneg war-
raok, ne vern ar framm
(skolioù katolik, publik
ha Diwan)**



Maryane Sabatier, kuzulierez Rannvro Languedoc-Roussillon, Henri Goetschy, senatour Colmar e bro-Elzas, ha Jean-Yves Cozan, bezprezidant Kuzul Meur Penn-ar-Bed e-pad ar c'hendiviz d'ar Sul 25 a viz Mezheven.

**Da gentañ tout ez eo bet
termenet stummoù disheñvel
deskadurezh ar brezhoneg er
skolioù o renabliñ 4 anezho :
kentelioù brezhoneg er
c'hentañ derez,**

**kelennadurezh ar brezhoneg
en eil derez (LV2, LV3,
staliou-labour), deskadurezh
divyezhek hanter/hanter,
kelenn brezhoneg dre ar
soubidigezh. Testenn diazez
ar Breujoù a bouez war
gement-mañ : diorren an
deskadurezh divyezhek er
bloavezhioù o tont evit
erruout da nebeutañ da 6000
bugel e 2000 ha 15000 e
2010 (2200 bugel hiziv an
deiz) gant ma vo doujet d'un
nebeud reolennoù sklaer :
aozañ un heuliad en holl
glasoù, priziañ brezhoneg ar
vugale en tri sistem
deskadurezh, kreskiñ lodenn
ar brezhoneg en endro :
panelloù, bruderezh, media,
buhez foran...**

"HOLL VUGALE BREIZH A ZLE GELLOUT DESKIÑ BREZHONEG"

Evit dont a-benn e c'houlenn ar
Breujoù e vefe krouet an niver a
bostou kelenn a zo ezhomm hag
heuliet ur politikerezh sklaer :
digeriñ ur c'hlas gant 12 bugel
ha pas kaout ouzhpenn 20. Ret
eo adwelout lodenn ha pouez ar
brezhoneg e kour ar Breujoù e
Goulenn a ra ivez ar Breujoù e
vefe sikouret TES gant an holl
galloudoù lec'hel evit ma c'hellfe
produiñ an danvez a zo ret.

"UR C'HUZUL BOUTIN"

Ar pep pouezusañ marteze ez eo
krouidigezh ur c'huzul karget da
renabliñ an ezhommoù ha da
heuliañ an ober. Er c'huzul-se e
vo kavet tud bugale ha
skolaerien eus ar skolioù Diwan,
Katolik ha Publik, tud en anv ar

galloudoù lec'hel, an aozadurioù
stummadur, studierien, TES...

Labour ar c'huzul a vo ivez
prederiañ asambles evit
termeniñ kriterioù priziadur fin
ar c'hentañ derez, sevel ur
programm deskiñ brezhoneg eil
derez boutin d'ar skolioù katolik
ha publik. Bez' e ranko ivez
soñjal en doare ma vo brudet ar
brezhoneg hag ar skol
vrezhoneg e-touez ar boblañs
(Kampagn bruderezh) hag an
dilennidi.

Laouen e oa eta J.Y. Cozan,
prezidant ar gevredigezh "an
nerzh nevez" bezañ deut a-benn
eus taol kaer ar Breujoù kentañ.
Disklêriet en deus e fin an daou
zevezh "Bremañ ez omp deut a-
benn da lemel an harzou
departamant, tu vo deomp ober
war-dro ar brezhoneg er skol e
pep lec'h e Breizh, ha se a zo
dispar." Bodet e vo ar c'huzul
nevez savet d'an 21 a viz Gouere
en Aodoù-an-Arvor ■

A.V.C.

PET BREZHONEGER A ZO E BREIZH ?

Emañ ar gelaouenn Octant, kelaouenn I.N.S.E.E. Roazhon (Ensavadur "Broadel" ar Stagedoù hag ar Studioù Armerzhel), o paouez embann, en he niverenn 56-57, ur studiaden diwar-benn niver ar vrezhonegerien. Er studienn-se, sinet gant Loeiz Laurent, bet rener I.N.S.E.E. Roazhon, e lavarer deomp ez eus 689 000 den o chom e pevar departamant ar rannvro "Bretagne" o kompren brezhoneg ha 518 000 ouzh e gomz.

Ne lavarer ket sklaer deomp penaos eo bet kaset ar studiaden-se war-raok : piv a voe goulenataet, petra oa ar goulennoù,.... Met bez' e c'haller kompren, pa lenner mat ar pennad, e voe enklasket 2206 familh e 1992 hag e voe kavet 1350 brezhoneger en o zouez. Disoc'hoù jedadennoù eo sifrou ar studiaden-se eta, evel ar sifrou all diwar-benn niver ar vrezhonegerien a voe embannet er bloavezhioù diwezhañ-mañ gant servijou I.N.S.E.E. Roazhon pe gant Fañch Broudig. Un deiz marteze hor bo sifrou o tout eus un niveradeg graet e-touez an holl dud o chom e Breizh...

Dispartiañ a ra Loeiz Laurent ar vrezhonegerien e tri rummad : ar re eo ar brezhoneg o yezh kentañ, 268000 anezho, ar re a gompren ar yezh dre m'int bet "soubet" e-barzh pa oant bilhan, 381000 anezho, hag ar re o deus desket ar yezh gant kentelioù, 40000 anezho. Tud kozh pe kozh a-walc'h an hini zo er rummad kentañ - 20200 anezho en tu-hont da 60 vloaz, ha 2000 anezho dindan 30 vloaz -, tra ma'z eo tud yaouank ar re zo en trede rummad. Mar konter an holl vrezhonegerien, an div drederenn anezho a vefe 60 vloaz pe goshoc'h. N'en deus ket Loeiz Laurent kavet kalz a gemm etre ar c'humunioù, ar "vrezhonegerien" zo o chom e kêr ivez, ha neket war ar maez hepken.

Diwar ar sifrou-se e c'haller embann e vez komprenet ar

brezhoneg gant 90% eus an dud zo labourerien-douar e Breizh-Izel, ha gant 46% eus ar re all.

N'eo ket dister an niveroù-se.

Eus ar re zo gouest da lenn brezhoneg e vefe 237000, tra ma vefe 447000 na ouifent ket lenn. Souezhet e c'haller bezañ o lenn seurt sifrou, dreist-holl pa weler e vefe 101000 den o'h embann e ouzont lenn mat. Hervez ar broioù e vefe disheñvel an dregantad a lennerien diwar an niver a vrezhonegerien : e Leon an hini e vefe ar muiañ a lennerien, goude-se e Tregor, e kreisteiz Breizh-Izel e vefe izeloc'h an dregantad. Ne lavarer ket deomp pet den a oar skrivañ. Tost da 300 000 den, a-douez an holl re a gompren brezhoneg, a selaoufe abadennoù skingomz pe skinwel e brezhoneg, 15800 o vezañ brezhonegerien "a-vihanik" (158/268=58% eus ar re-se a selaoufe abadennoù skingomz pe a sellfe ouzh abadennoù skinwel e brezhoneg eta). Selaouerien hag arvesterien zo, eta, evit an abadennoùigoù e brezhoneg. E-touez ar re yaouank e vefe 11000 den gouest da gomz brezhoneg, ha 1500 anezho a vefe brezhonegerien "a-vihanik", ar sifrou-mañ a souezho hol lennerien moarvat ■

I.K.

KAZETENNOU BREIZH

L'Avenir de la Bretagne
(POBL) 150 L/bloaz
BP 4103 - 22041 Sant Brieg Cedex 2

Combat Breton
(Emgamm) 150 L/bloaz
BP 71 - 22202 Gwengamp Cedex

Le Peuple Breton
(UDB) 160 L/bloaz
BP 301 - 22304 Lannuon Cedex

Armor Magazine
225 L/bloaz
Pont Sant Jakez
BP 419 - 22404 Lambal Cedex




**DEIZIATAER 95
ZO DEUET ER-MAEZ !**




E GWERZH E PEP LEC'H !


Brezhoneg yezh kentañ



Brezhoneg yezh klevet



Brezhoneg yezh desket



Testeni

BREZHONEG YEZH OFISIEL EN ARCHERDI LANDIVIZIO

"D'an 10 a viz Mae e teu archerien Landivizio du-mañ da gas ul lizher o c'houlenn groñs ouzhin mont d'o zi an abretañ ar gwellañ. Pa ne oan ket er gêr e lavaront da'm gwreg ez eo abalamour d'un istor panellou-hent livet war-dro Montroulez.

Divizout a ran mont d'o gwelout d'ar sadorn. Pellgomz a ra an archerien din evit gouzout peur emañ e soñj mont peogwir ez eus mall warno klozañ an teuliad-se.

Da deir ez an dirak archerdi Landi, ambrouget gant un toullad kamaladed, skritelloù SAB ha Gwenn-Ha-Du ganto.

Mont a ran tre en ur gaozeal brezhoneg, va c'hamaladed a chom er-maez. Un archer a respont brezhoneg ouzhin, ouzh va fedin d'azezañ ouzh e daol. Souezhet eo gant va emzalc'h un tamm, ha goulnenn penaos e ray ma ne c'hell ket skrivañ e zanevell (PV) e galleg. N'eo ket va c'hudenn, emezon, gant ma vo skrivet e penn kentañ e zanevell e komzan e brezhoneg hepken. Skrivañ a ra ar frazenn-se a-raok kregin gant ar goulnennoù. Diskouez a ra poltriji eus va c'harr kemeret e-kerz manifesta-deg SAB e Montroulez d'an 19 a viz Meurzh.

E brezhoneg atav e c'houlenn ouzhin petra 'm eus da lavarout? Ha me da soñjal ha mat eo din kenderc'hel da gomz, e brezhoneg, pe chom mut. Daoust ha n'eo ket deuet ar brezhoneg amañ da vezañ ur benveg ouzhpenn e servij gwaskerezh Bro C'hall e Breizh?

A-benn ar fin e tisplegan dezhañ e'm boa heuliet an deiz-se ur galv a-berzh SAB da vont da lidañ 10t bloavezh ar strollad. Daoust ma



ne'm boa livet panell ebet va-unan, ez on a-du gant an doare-stourm-se da dizhout hor pal: anout ar brezhoneg da yezh ofisiel e Breizh, o kregin gant ar panelloù-hent, ar skinwel, ar skolioù, ar melestradur h.a.

Un hantereur war-lerc'h e'm eus kuitaet an archerdi, goude nac'h sinañ e zanevell. Va gortoz a rae va c'hamaladed dirak an ti. Aet omp kuit en ur lavarout e kendalc'ho ar manifesta-degoù keit ha ma ne vo ket ar brezhoneg yezh ofisiel e Breizh, daoust d'an dud harzet ha goulnnataet.

Un nebeut devezhioù a-raok e oa bet goulnnataet ur paotr all eus kostez Kastell-Paol evit an hevelep abegou."

G. Kabon

14 a viz Gouere E BREIZH

DEVEZH PREDER HA DUDI gant S.A.B./Stourm ar Brezhoneg e Boulvriag ha Fest-Noz Vras. Digor d'an holl vrezhonegerien!

Da 10e mintin e krogo an traoù, kendiviz ha raktresoù.

9e noz FEST-NOZ gant Strobinnell; Marsel Gwilhous - Annie Ebrel; Serj Louarn - Loeiz Tomaz; Breudeur Morvan; Savidan ha Marius. Pik-nik dirak al lenn e-tal d'ar sal adalek 6e abardaez!



Naoned

Ar porzh da gentañ an endro war-lerc'h...



Ar C'huzh-heol bras en deus ezhomm eus ur porzh bras europat hag etrevroadel". Setu ar pezh a lavare Michel Barnier, ministr gall an endro e Naoned ur bloaz 'zo. Gant seurt komzoù ne oa ket en arvar dazont ar porzh.


AR PORZH O KRESKIÑ

Gant 24 milion a donennoù eskemmet eo porzh Naoned Sant-Nazer kentañ porzh Breizh. Pep tra ez a gantañ: eoul-maen, kirri-tan, koad, glaou, frouezh hag all. Tout-se a vez degemeret pe gaset e c'hwec'h lec'h: Sant-Nazer-Penc'hoed, Mouster-al-lac'h, Donvez, Chevre, Chantene hag ar c'hae Wilson (e Naoned).

Gant ar raktres adkempenn ar rannvroioù divizet gant ar gouarnamant gall, ar porzh zo deuet da vezañ ur benveg priziuz evit an dioren ekonomikel. Ret eo kavout plas evit embregerezhioù nevez, o deus ezhomm eus servijoù ar porzh. Setu perak ez eus bet dibabet daou lec'h pouezus: e Sav-heol Donvez hag er Charned rak an dour a vez don a-walc'h eno.

UL LIGER GOUEZ ?

Daoust da gomzoù ar saverien stankoù n'eo ket ken gouez al Liger: pa weler al lec'hid betek Santez Lus, e Sav-heol Naoned, e weler pegen toullt eo bet al Liger? Re zon evit nebeut a red. Mont a



veskañ stêrioù n'int ket re zon e lec'h ma vez tommet aes an dour en hañv, daoust d'al lec'hid a zeu pep bloaz. Gant ar pesked e teu meur a labous a gav peadra da zebriñ.

DAZONT AN ENDO, DIVIZET GANT AR PORZH.

Ar porzh a fell dezhañ reiñ ur skudenn a embregerezh digor da gudennou an endro. Setu perak ez eo bet kemennet e vo doujet an enezenn Bilho (an enezenn brasañ e-tal Sant-Nazer) gant ar raktres diorren, 1500 hektar a vo roet da Mirva an Arvor.

Evit an SEPNB (Kevredigezh evit Studi ha Gwarez an Natur e Breizh) ha "Liger o vevañ", netra ne dalvez ul lec'h priziuz evel Donvez. Louis Vilaine, prezidant kevredigezh ar besketarieren e dour dous el Liger-Atlantel, a lavar: "N'omp ket a-enep an diorren, met fellout a ra deomp e vefe goulnennet hon hini". E penn 200 pesketaer a-vicher emañ.

Etre ar Re C'hlas ha tud a-gleiz ez eus bet prederiet war diorren ar porzh: da gentañ, ar porzh n'en deus ket ezhomm a gement a blas, rak plas a zo dija (an douaroù er Charned hag ar plas laosket gant EDF e Chevre). Ha plas a vo mard a ar bigi ELF e-tal ar Groazig. Da eil, diorren ar porzh a c'hell bezañ a-enep embregerezhioù ha postou-labour: ar besketarieren, sur, met ivez raktres un embregerezh e Pembo hag en deus ezhomm a galz a zour dous a galite. Efin, toullañ al Liger a zo koustus: stankoù abalamour d'al lec'hid a vo savet el Liger hag er Stêr Sevr: 95 milion a luroù gall. Lakaat an dour dous evit Naoned eus Koueron da Vovez: 145 milion. Ar c'housoù-mañ n'int ket bet lakaet e kont ar porzh.

Divizet eo bet gant ar gouarnamant gall e vefe brasaet ar porzh e Sav-heol Donvez. Al labour a grego er mizioù da zont. Pouezañ a ra un nebeud difennerien an natur e-tal interestoù ar porzh. Ha perak eo ret degemer an holl vigi er memes porzh? Ar plas ne vank ket e Breizh (An Oriant, Brest, Sant Malo) pe e lec'h all (Ar Roc'h'ell). Met divizet ez eus bet ober traoù divent: kêrioù bras, porzhioù bras, hag un endro bihan.

Benead Lukian

Ar bihanniveroù a zo bras o levezon

S. Moscovici a zo bredoniour. Plediiñ a ra gant unan eus rannoù e skiant, bredoniezh ar gevredigezh.

PATROM AR BIHANNIVER

Klasket en deus S. Moscovici kompren emroadur ar c'hevredigezhioù, da lavarout eo displegan penaos e teu ar gevredigezh-mañ-kevredigezh a-benn da nevez. Evel-se en deus meizet ne veze ket nerzh ar mennozhioù nevez diouzh niver an dud a oa ouzh o difenn hag e c'helle ar bihanniveroù bezañ bras o levezon [1].

Al levezon ha an nerzh-se, hervez S. Moscovici, a zo stag neket ouzh niver izili ar bihanniver hogen ouzh o emzalc'h, a zo dibar. Daou zibarder a wel ar bredoniour: "Lakaat a reont buan ar c'hudennoù da vezañ kenniñvoù [...]. Derc'hel a reont d'o mennozhioù ha ne var-c'hatoat ket" [2].

Resisaomp a-hend-all, e komz S. Moscovici eus ar bihanniveroù "oberiant". En degouezh-se e wisk dalc'hmat ar mennozhioù stumm an ober.

LEVEZON DIWELUS

Un evezhiadenn bennak all digant S. Moscovici a frealzo meur a emsaver. En em c'houlenn a reont alies pe levezon o deus war ar Vreizhiz. Ret eo hen anzav: n'eo ket anat-anat.

Bezañ dianat a zo, dres, diouzh natur levezon ar bihanniveroù: "Er penn kentañ, eme S. Moscovici, eo enklaket al levezon. Gant dale e kemm an dud. Ne vez ket anat al levezon, da skouer, goude an arnod mant dont a ra war-wel teir sizhun goude" [3].

AR RE ALL

Ar bihanniver a zo start dezhañ muzuliañ e levezon. Ken start all eo d'an den levezonet: "Ur souezhadenn all, eme S. Moscovici, eo e kemm an dud hep gouzout dezho. Seul vrasoc'h eo levezon ar bihanniver mar bez nac'het."

Un dalvoudegezh arall en deus ar bihanniver. Digeriñ a reont d'an holl prenestroù nevez war ar gwinvoud. Ma ne laka ket ar re all da zegemer ar mennozhioù arnevez, e kemm, dre ret, o sell war ar bed. Un harz eo ar bihanniver ouzh unveli ar mennozhioù degemeret gant an holl.

Pa grog ur mennozh arnevez d'ober berzh, avat, eo techet ar bihanniver da zibab gizioù "flouroc'h" ar brasniveroù. Bez' e c'hell koll buan, neuze, al levezon en doa gounezet a-drugarez d'e stad a vihaniver. Hep dale e chom sac'het ar mennozh degemeret gant an holl ha ne zegas kemm fetis ebet ken er gevredigezh. Kement-se a zo en em gavet, hervez S. Moscovici, gant S.O.S. Racisme koulz ha gant an ekologourien.

Ar brasañ gounid a c'hell tennañ ar mennozh arnevez, en diwezh, eus oberiantiz ar bihanniver gouestlet dezhañ. Dre-se e tle difennerien ar mennozh arnevez dibab ervat o giz, hini ar bihanniver pe hini ar brasniver. ■

Paskal Ar Marc'heg

kenniñvoù, conflit - enklaket: latent - imbourc'hiva: kreizenn imbourc'h

[1] Embannet en deus ul levr anvet Psychologie des minorités actives, P.U.F, 1979 ha 1991

[2] Komzoù tennet eus "L'influence n'est pas la manipulation", Sciences Humaines, n°37, Meurzh 1994

[3] S. Moscovici a ra dave amañ da arnodoù bet kaset da benn en imbourc'hvaou bredoniezh. Bez' e kinniger, da skouer, d'ur strollad, luc'hvannoù warno pep a liv. An dud a rank lavarout pe liv a welont. D'ur poent bennak e kinniger ul luc'hvann glas. Unan eus izili ar strollad, hag a labour gant an arnodou hep gouzout d'ar re all, a lavar eo gwer. Derc'hel a ra start d'e lavar. Teir sizhun goude, pa ginniger al luc'hvann glas d'an hevelep strollad, eo kresket niver ar re a lavar eo gwer al luc'hvann.

Taolioù-pluenn

Kaoc'h evit ar brezhoneg

D'ar 25 ha d'ar 26 a viz Mezheven en deus J.-Y. Cozan aozet ur vodadeg vras e Pondi: BREUDOU AR BREZHONEG. Evit kas al labour-se da vat, en deus goulennet skoazell digant ar C'huzul Rannvro ha digant Kuzulioù-Meur ar pemp departamant breizhat. N'eus bet respont ebet digant Kuzul Jeneral ar Morbihan: ar pezh n'en deus souezhet den. Ur respont dre nann a zo bet digant Kuzul Jeneral Il-ha-Gwilen: ar pezh n'en deus souezhet den ivez. Gant un dra eo bet souezhet, sabatuet an dud avat: gant ton ha gerioù ar respont. Ret eo reiñ ar galleg orin: "Nous estimons que les problèmes de la langue bretonne ne nous regardent pas." Ya: kement-se a zo bet skrivet. Lennit en-dro. Un eil gwech. Un trede gwech. Ha komprenit mat! Komprenet hoc'h eus?

Ar studierien e Skol-Veur Roazhon 2? kement-se ne sell ket outo.

Ar c'hlasoù divyezhek, kelenn brezhoneg en Il-ha-Gwilen? ne sell ket outo.

Ar moulañ, an embann, ar vicherourien a ra war-dro kement-se? Tavit! Netra! Ne seller ket outo.

An ensavadurioù, ar c'hevredigezhioù, an holl re-se hag a ra war-dro ar yezh: ne seller ket outo!

Brezhonegerien Roazhon hag Il-ha-Gwilen: ne dalvont mann evit Kuzul Jeneral an Il-ha-Gwilen!

Ur vezh!

Ur flac'had e-kreiz hor fas!

Ret eo lakaat an traoù sklaer: a-du emañ, pe n'emañ ket, gant ar respont rener ar C'huzul-Meur, da lavarout eo an Ao. Méhaignerie? A-du emaint, pe n'emañ ket, gant ar respont, an dilemmidi a zo er C'huzul, a anavezomp lod anezho? Ret eo dezho, d'an holl, respont. Ha ni ivez a ouio reiñ ur respont. ■

Harri



BISKOAZH KEMEND-ALL!

E Pondi, da geñver Breujoù ar Brezhoneg, e oa en em gavet Rector Akademiezh Roazhon, an Ao. An Ostiz, genidik eus al Leoun doun. Deut ez eus gantañ unan na oa bet klevet morse c'hoazh: "Rediet on bet", emezañ, "da studiañ brezhoneg er skol (paour kaezh patrig), e 1941, war urzh an Alamaned!" Iche! Ha c'hoazh, en ur skol libr e oa bet savet! ■

HAGEGE: YA PE NANN?

Unan vat a zo deut gant an Ao. Hagege ivez. Graet ar goulenn-mañ outañ: "Hag-eh emaoch a-du gant ar Garta Europat evit ar yezhoù bihan? Rak traoù disheñvel-kaer hon eus lennet diwar-benn-se er c'helaouennoù..." Respont Hagege: "En prevez am eus mennozhioù 'zo. Met e Kuzul Meur ar Galleg on bet anvet..." Setu petra eo an divyezhegezh. Ur c'huzul prizius a zo bet roet deomp avat: "arabat reiñ d'ar gouarnamant da soñjal e c'hellfemp lakaat ar galleg en arvar." ■

EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG

Kazetenn evit deskiñ brezhoneg
 B.P. 3 • 29450 Kommanna
KOUMANANT BLOAZ
 6 niverenn - 75 lur

KARNEDOU-CHEKENNOU E BREZHONEG

Kement-mañ n'eo ket bruderez evit ar C.M.B. Rak, pa vez keloù da gaout skoazell-arc'han evit ur raktres brezhonek bennak, n'eo ket gwelloc'h ar C.M.B. eget ar bankoù all.

Koulskoude, arabat disoñjal ez eus bet embannet karnedou-c'hekennou divyezhek gant ar C.M.B. Bloavezhioù 'zo. Disoñjet pe damzisoñjet eo bet an dra. Dreist-holl pa ne vez MORSE goulennet gant ar C.M.B. ouzh e bratikoù hag-eh n'o defe ket c'hoant kaout karnedou-c'hekennou divyezhek. Neuze, m'oc'h stag ouzh ar C.M.B., it diouzhtu betek hoc'h ajañs ha lavarit, gant ur mell mousc'hoarzh seven evel just: "C'hoant am eus da gaout ur c'harded-c'hekennou divyezhek - hep gortoz ma vo echu ar c'harded a zo garin."

Kasit ul liherig da v-Bremañ pa vo ho karned nevez ganeoc'h. Ha kasit ul liher hiroc'h ma vefe nac'het - ken souezhus e vefe! ■

Harri

BBB Bank Broadel Breizh MEL 189,64

paell evit ar chekenn-mañ na c'heller
 karnvekañ nemet evit gouzout ur ti-bank pe damzisoñjet
kontañ nau lur ha pevar ugent,
pevar santim ha tri ugent
 da Bremañ - 8, straed Hoche - 35000 Roazhon - heb Naoned
 da 21 mae 94

da vezañ paell e
 CCM NAONED
 P.O.Z. 98.55.20.19
 da vezañ karnvekañ e
 NAONED

KERVELLA YANN
 10 STRAED AN EMGLEV
 44000 NAONED

15589 29330 00478848540 45 [R18]

KOUI YAMGNANE

D'ar 26-27 a viz Mezheven, ur bajennad a-bezh er Monde diwar-benn Koufi Yamgnane. Bez ez eo bet K.Y. ministr an itegrasion, da lavarout eo, da gomz sklaer, ministr ar gallekaat: "Ar gwir da vezañ disheñvel diouzh ar re all", emezañ, "a rank chom e toull dor ar skol". Souezh ebet: a-enep d'ar Garta Europat evit ar yezhoù bihan eo bet, hag emañ c'hoazh emic'hañ, Koufi Yamgnane. E-kreiz ar pennad ez eus ur skeudenn eus Koufi gant ur jiletenn giz-Breiz, war e skoaz ur seizenn erminiget, ha war e dro merched gant koufou giz-arvro (?). Ha setu ar pezh a gont diwar-benn J.Y. Cozan. "Lakaat a ra un tog breizhat war e benn pa ya da welout ar Vretoned, hag ur boned euskarat evit diskouez emañ a-du gant ar Vretoned o deus roet bod da Euskariz o stourm evit ur vro dizalc'h." (O! O! A-du gant ar barner-enklask?) "Ha petra 'soñjit

eus ar rannvroelouriezh vreizhat?" a c'houlenn ar gazetennerezh. "Ma anver rannvroelouriezh ar youl da wareziñ ar sevenadur hag ar yezh vrezhonek, emaoñ a-du. Met arabat d'ar rannvroelourien lakaat en arvar unded ar Republik. Un niver kevredigezhioù a zo o labourat evit ar sevenadur hag ar yezh vrezhonek. Atav em eus bet c'hoant ma ve paouezet e-pad ur pennad-amzer."

Ha peiget e pado ar pennad-amzer-se? ■

Harri



RAKTRES PASQUA

BRO-C'HALL ETRE AN DEZERZH HAG AR RANVROIOÙ

Pasqua a zo deuet a-benn da lakaat e raktres terkañ triad Bro-C'hall da dremen dirak ar gouarnamant. Muioch a stad adarre gant kresk galloud ar prefed, an departamant benveg an adkreizennañ enebet ouzh ar rannvro evit brasañ gounid ar galloud e Pariz.

Ur raktres all war ar stern gantañ : krouiñ seizh "ec'honder terkañ a live Europa". Kornôg Bro-C'hall a zeufe da vezañ "Loire-Armorique" e anv, dek departamant ennañ (Breizh 4 departamant + "Pays de la Loire" + departamant ar "Manche"). An holl raktresoù-mañ bet sevennet e kuzh, e burevioù ar ministrioù e Pariz. Gourduzet en deus kuitaat ar gouarnamant ma vije nac'het pe zoken distummet un tamm eus e raktres. Petra laka anezhañ da vezañ ken stag ouzh e raktres ? Ur studiadenn kaset da benn gant an O.I.P. (Observatoire Interrégional du Politique) a c'hello marteze hor sklerijennañ.

Skeudenn ar rannvro e spered ar C'hallaoued a ya d'ober danvez ar studiadenn-mañ, bet embannet gant "La Documentation française", e deroù 1994. Ar C'huzulioù Rannvro hag an O.I.P.

o deus sinet un emglev evit studiañ bep bloaz an doare ma vez degemeret / merzhet ar fed rannvroel er gevredigezh. Setu un diverrañ eus an disoc'hoù.

AN DIAZEZOÙ

Stag eo ar C'hallaoued ouzh o gwiziennoù, 50% anezho a chom er rannvro e-lec'h ma veze dija meur a rummad eus o hendadoù (63% e Breizh). 45% anezho o deus c'hoant da chom en o rannvro (ouzhpenn 50% e Breizh).

An darn vrasañ eus ar vuhez pemdeziek a zo stag ouzh an endro nesañ evit 84% anezho. Merañ ar fedoù kevredigezhel a denn d'al lec'hel ha d'ar maezioù a zo pouezusoc'h eget ar c'hudemoù broadel evito. 64% a gav gwelloc'h e vefe diorroet rouedad lec'hel an hent-houarn eget an TGV (31% evit an TGV). 61% a zo a-du gant an ospitalioù lec'hel kentoc'h eget ar vras. 62% a gav dezho a dra sur ez

eus re a c'halloud (tud, obererezh, archant) gant Pariz, 20% a respont marteze ha 10% a soñj a c'hontrol.

PERZHIΟΥ AR RANVRO

78% a soñj dezho ez eo ret mirout niver ha bevennoù ar rannvroioù evel m'emaint. 62% a soñj ez eus o rannvro. 53% a soñj ez eus un dazont gant ar rannvro, n'eus nemet 45% o soñjal heñvel diwar-benn Bro-C'hall. Un aozadur tost outo eo ar Stad evit 22% anezho, ar rannvro evit 63%, ar departamant evit 76% hag ar gumun evit 90% (meur a respont a oa posupl).

Skeudenn ar Stad az a war bellaat : evit 51% e oa pell eus ar bobl e 1991, evit 74% e 1993. 60% eus an dud a soñj dezho ez eo ret krefivaat an digreizennañ. Kadoriad ar C'huzul Rannvro a zo an den plasat gwellañ evit kas an digreizennañ war-raok evit 25% eus an dud goulnataet (Kadoriad ar C'huzul departamant : 16%, an depute : 15%). E 1986 e oa, en hevelep urzh, 18%, 16% ha 21%.

AR RANVRO : UNVEZ MELESTRADUREL AN DAZONT

70% a soñj dezho ez eus un dazont gant ar rannvro (59% e 1986, 67% e 1989). Gant an departamant ez eus un dazont evit 20% nemetken (25% e 1989).

An dregantad en ur renkañ ar respontoù hervez ar strolladoù politikel :

UDF : 77%, RPR : 75%, PS/MRG : 73%, Génération-Écologie : 74%. Nebeutoc'h a vouezhoù evit ar rannvro a gaver etouesk ar re a zo tost ouzh ar PC (67%), ar Re C'hlas (67%), ar FN (66%).

Hervez ar rummadoù micherel ez eus ivez un diforc'h : 80% eus ar gadred a sav a-du gant ar rannvro evit 65% eus ar vicherourien (26% a-du gant an departamant).

DAEOU AR RANVRO

Betek dibenn ar bloavezhioù '90 e oa ar renkadoù etre hag uhel eus ar gevredigezh a save ar muiañ a du gant ar rannvro. Abaoe, ez eo deuet an dilabour da vezañ prederiadenn gentañ ar vro. Af Stad, merzhet evel ur framm re bell eus ar vuhez pemdeziek ha di-houest da reiñ ur

respont d'an dilabour, a zo kemeret he flas gant ar rannvro e penn ar re a zo prederiet gant ar gudennoù-mañ. 83% eus an dud goulnataet a zo a-du evit reiñ muioch a c'halloud d'ar rannvro war dachenn ar stummañ, ar skoazell d'an embregerzhioù (77%), met ar sevenadur a dap 58% ar respontoù nemetken.

Menoù ar "région-providence" a zo o kemer plas an "Etat-providence" tamm-ha-tamm. D'ar rannvro e vo ret ober an diabou pouezusañ war dachenn ar stummañ, an armerzh hag ar veched. Krouiñ ar skolioù-meur a zo kefridi ar rannvro evit 35% anezho (29% evit ar stad). Krouiñ takadoù greantel a zo kefridi ar rannvro evit 30% anezho (29% evit an departamant, 28% evit ar c'hmunioù).

GWAREZIÑ PERSONELEZH AR RANVRO

Dilañs a zo bet tapet gant ar rannvroioù krouet nevez zo gant ar Stad :

- Ar bevennoù ne glotont ket gant bevennoù ar broioù kozh pa n'eo ket bet ar rannvroioù-se krouet diwar mann.
- Kevezerezh a zo graet d'ar rannvro gant an departamant, arouez an Dispac'h Gall.
- Dasparzh al labour etre ar rannvroioù e karg eus prientiñ an dazont hag an departamant e karg eus ar vuhez pemdeziek.

Daoust d'an dilañs-se ez eo ar rannvro war an hent da vezañ anavezet he fersonelezh gant ar boblañs. N'eo ket mui diouer a wriziennou istorel ha sevenadurel ar rannvroioù nevez ur skoilh d'o anaoudegezh gant ar boblañs. Na bevennoù nag anvioù ar rannvroioù n'int hiziv kudennoù evit ar C'hallaoued.

Pa c'houlenner diganto ouzh peseurt live framm en em santont ar muiañ stag e respontont ez eo ar gêr pe ar gumun evit 43% anezho, Bro-C'hall (33%), ar rannvro (13%) (Breizh ha Bro-Elzas : 20%).

Da zibab etre pemp termenadur eus ar rannvro ez eus bet roet dezho : - kumuniezh denel ha sevenadurel : 32% (50% e Breizh hag e Bro-Elzas)

- lec'h diorroader an armerzh : 24%
- Un terrouer : 20%
- Melestradurezh : 11%
- lec'h eskemm (breud) politikel : 5%
- direspont : 8%

Ne ra ket berzh an dave d'un terrouer e rannvro ebet, ar pezh a ziskouez ez eo bet dilevezon skouer an hevelebekadur diazezet peurvuiañ war an adperc'hennañ personelezhioù kozh ar "provisoù", zoken er rannvroioù a gлот o bevennoù gant re ar "provisoù" kozh.

DEDENNAÑ AR GEODEDERIEN

Diorroader personelezh ar rannvro da vat a zo stag ouzh ur fed diwezhañ : ar parlamant rannvro a zo al lec'h ma vreaeter an doare da vevañ asambles er rannvro. Anat ez eo emañpell ar C'hallaoued eus an emskiant politikel a live ar rannvro (5% : rannvro = lec'h breud politikel).



N'eus nemet 8 vloaz zo ez eo bet dilennet ar guzulierien rannvro gant an holl geodeourien. N'eo ket an doare-votñ dre zepartamant evit kas war-raok ar rannvro evel boud politikel. Erfin, meskañ ar votadegoù (dilennadegoù lezennel pe kanton) e vir ouzh an dud a gaut un emskiant resisoc'h eus ar boud-se.

Emzalc'h diseblant ar boblañs az a asambles. E 1991 e oa 52% eus an dud a soñje dezho e oant dilevezon war dazont o rannvro, 34% a soñje dezho e c'hellfent kaout ul levezon, ha 10% a oa sur da gaout ul levezon.

Un diforc'h a verzer hervez ar rummadoù-mañ : Ar baotred (47%), ar frammedi (55%), annezidi ar c'herioù bras, ar re

yaouank a soñj dezho e c'hellont kaout muioch a levezon : < 34 bloaz : 59% 35-49 bloaz : 49% 50-64 bloaz : 38% >65 bloaz : 13%

Dae bras ar rannvroioù en dazont a vo : krefivaat dre gresk emskiant rannvroel ar geodeourien. Emzalc'h yael ar boblañs a gas ar rannvro war-du an hent-se. Emzalc'h ar voterien d'an dilennadegoù diwezhañ a zo kalonekaus ivez : 69% a voterien daoust da gresk niver an nann-voterien abaoe 1988.

N'emaomp ket pell ken eus ur gwir emskiant politikel a live ar rannvro. Etre ar gumun, tachenn an trivladel hag an "nasion", tachenn an arouezel, ar rannvro a c'hell en em lec'hiañ e tachenn ar poellek evit dedenniñ un darn vat eus ar boblañs. Un alchwez evit lakaat ar C'hallaoued war hent savidigezh Europa.

Berzh ar rannvro a c'helle digeriñ war emzalc'hioù disheñvel eus perzh ar voterien e-keñver ensavadurioù disheñvel a ziv evit vro. Diouzh barregezh ar rannvroioù da skañvaat efed an enkadenn armerzhel gant ur politikerezh tost ouzh an dud e vo an disoc'h.

Daoust hag e vo gouest ar rannvroioù da gas da benn ar gefridi (diskoulmañ kudennoù an dilabour, an enkadenn armerzhel...) evel m'emañ ar boblañs o c'hortoz ?

Peadra da brederiñ evit pep hini er studiadenn-mañ. Aesoc'h da gompren emzalc'h Pasqua ne c'helle ket gouzav ar mennoz e vefe ar rannvroioù war hent an emskiant politikel emren.

P. Lanoe

*O.I.P / Les Français et leur Région. Le fait régional et l'opinion publique, La Documentation Française, 1994, 48 p., 70 F.

Euskadi an hanternoz

HEOL HA KOUMOUL WAR AR SEVENADUR HAG AN ARMERZH

Evel ar Vretoned emañ an Euskariz o preder war dazont o bro. Ar bloaz 2010 a zo bet lakaet ganto da bal o freder. Daoust d'an diforc'hioù a zo etre hon div vro e c'heller moarvat tennañ gounit eus un taol lagad war stad an traoù duhont.



ingal abaoe meur a vloaz o deus ranket serriñ. War ar 45 embregerezh ma kemer perzh Herrikoa enno, en em gav 13 war hent an advs lezennel ha 15 en diaezamant bras.

Nebeutoc'h a bostoù skoazellet ivez : ur c'holl a 63 fost a zo bet dindan ur bloavezh. An 2/3 eus an arc'hant postet a sell ouzh staliou en arvar pa n'int ket o vont da goll da vat.

Teñval an dazont eta ha koulskoude e chom Herrikoa ur chañs evit ar vro hag ur berzhiadeg a-bouez bras evit an armerzh lec'hel. Goulennoù e-leizh a sav eus perzh ar gevranneien. Ouzhpenn an abegoù e liamm gant an enkadenn dre vras, e kav d'ar berzhidi ez eo re dreut evit c'hozh ment ar gevarzhe. Dre se ne c'hell ket degas skoazell en tu all da 2 M a luriou, ar pezh a laka anezhi da vezañ dic'halloudus pa vez en ur stal ezhommou bras ha mallus. Lakaet eo bet ar biz ivez war kudenn ur studi pizh eus an teuliadoù goulenñ skoazell, ha war an doare da heuliañ an traoù. Re laosk e vefe al liamm etre Herrikoa hag ar stallioù skoazellet ganti.

ARMERZH : AVEL YEN, AVEL FLOUR

Ur gevarzhe eo Herrikoa, savet e 1980, lakaet da bal dezhi dastum arc'hant an Euskariz kar-o-vro ha skoazellañ embregerezhioù diazezet er vro, barrek da zegas labour ha da zerc'hel an hent. Betek 1991 ez eo aet an arboellañ hag ar postañ war-raok ingal : kresk war niver ar gevranneien, war ar c'hevala enbarzhet (eus 7,5 M a luriou e 1990 da 12 M e 1993), war ar postoù krouet (833 fost betek 1989 ha 1303 e 1993).

1993, UR BLOAVEZH DU

Koulskoude ez eo bet tizhet Herrikoa gant an enkadenn ha renta-kont an emvod-meur diwezhañ a voe kriz a-walc'h. N'he deus ar gevarzhe skoazellet ar bloaz tremenet nemet 7 embregerezh. 3 stal skoazellet

SOKOA : BROADELOURIEZH HA MEREREZH

Ar stal Sokoa a voe-hi krouet e 1971, koshoc'h eo eta eget ar gevarzhe arboellerezh. Met dedennus eo teuler ur sell ouzh he stad rak kemeret he deus perzh e ganedigezh Herrikoa ha chomet eo en emsav-se. En he yaouankiz ne reas Sokoa nemet gwerzhañ arreburi evit ar burevioù a veze fardet en tu all d'ar Pirenoù. Kemer harp war al liammoù a oa etre Hanternoz ha Kreisteiz evit dorrer an armerzh nevez en tu-mañ, sed aze ar pal a oa hini Sokoa er penn-kentañ. Hiziv ez eo emren ar stal ha berzh he deus graet en ur mod dic'hortoz. War marc'had an azezennoù burev e talc'h an trede plas e Bro C'hall a-bezh gant 180 000 kador gwerzhet bep bloaz, da lavaret ur c'hresk a 20 % en ur marc'had a zo war ziskenn a gement 96 den a zo gopret gant an embregerezh ha kemer a ra perzh 380 kevrannegezh evit ur c'hevala a 25 M a luriou.

Meur a skoilh he deus kavet Sokoa war he hent. A-berzh galloudoù an arc'hant da gentañ penn p'eo bet difennet outi dre ziv wech kreskiñ he sammad

kevala. A-berzh ar galloud politikel ivez : e 1986 e voe dizoloet armoù ha dielloù ETA e-lec'h ma oa staliet Sokoa ha teir embregerezh all. Un drederenn



Stal nevez Sokoa

eus ar c'hopridi hag a oa repuidi a voe bac'hiet pe kaset d'ar stad Spagn, hag e voe lakaet en arvar bras yec'hed arc'hantel an embregerezh, met ivez ar mennozh a genskoazell hag a genlabour a oa bet o ren betek an deroù.

Gouest eo bet Sokoa da liammañ ur mererezh pizh ha sklaer gant ur dezrann kempouezet mat eus ar gounidoù etre ar c'hopridi, ar c'hevala ha mont en-dro an embregerezh.

AR SEVENADUR EUSKARAT EVEL UN ESTREN WAR E ZOUAROU

Euskadi an hanternoz, 250 000 annezad, ouzhpenn 80 M a luriou ha 250 post leun amzer gouestlet d'ar sevenadur. Ne c'heller ket lavaret ez eo ar vro ur gouelech sevenadurel. A-dreñv ar sifroù ur

wirionez ha n'eo ket ken brav. Un digempouez bras a zo etre an arc'hant a vez postet da skoazellañ an oberiantizoù sevenadurel war an aod (87 % evit 65 % eus ar boblañs) hag ar bruzañ a vez lezet da ziabarzh ar vro. Evel just e vez da ziabarzh ar digempouez pa seller a-dost ouzh ar pezh zo kuzhet dindan an anv brav a sevenadur. Dre m'eo lakaet ar miuañ a arc'hant war an aod e vez ivez lakaet er renk kentañ an oberiantizoù sevenadurel gall : festivalioù sonerezh klasel ha c'hoariva...

War an aod ar vuhez sevenadurel arnevez o tont eus Pariz pe eus Madrid, er menezioù ar folkloraj kozh. N'eo ket ken teñval an daolenn pa ouezer ar striv graet gant ar c'hevredigezhioù lec'hel war tachennoù ar c'hoariva hengounel, ar c'han hag ar varzhoniezh pe an dañs. Met aze c'hoazh en em gaver dirak un direizhder anat. War ar sammad a vez postet en oberiantizoù sevenadurel e vez al lodenn vrasañ war choug ar c'hunioù (48 %). Ar stad a ro 9 %, ar rannvro 4 % hag an departamant 5 %. Kumunioù pinvidik an aod n'o devez poan ebet da aozañ melloù abadennoù koustus o tont a zivavaez bro, hogen parrezioù bihan ar menez ne zeont ket a-benn zoken da skoazellañ o c'hevredigezhioù.

Un dibab eo hag a zo graet gant ar bolitikoerien ha n'eo ket diemskiant a dra sur ■ Mich Beyer

KEMENNADENN UNVANIEZH DEMOKRATEL BREIZH


Sevel a ra Unvaniezh Demokratel Breizh a-enep ar pezh zo c'hoarvezet nevez 'zo pa'z eo bet galvet ha bac'hed e Karaez hag e Loudieg tud a oa an diskred warno bezañ roet bod da Euskariz. Kavout a ra dezhi ez eo ur seurt doare-ober (hag a zo bet graet gantañ a-ziagent evit tud all evit an hevelep abeg) ur muzul evit spontañ emsaverien a vez o doareoù-ober demokratel penn-da-benn, ha se pegen pa vez galvet ha bac'hed tud un nebeud devezhioù a-raok votadegoù Europa a oa enno war ar renk dileuridi pobloù ar Stad C'hall.

Soñjal a ra dezhi e klasked tizhout tud a ouier en a-raok da vare ar galvadennoù e oant digablius, o vezañ ma'z eo anat n'eo ket bet graet evit tud galvet 'zo an difraeoù-anavezout boas.

Adlavarout a ra ez eo reizh reiñ bod da repuidi a vez diaes an traoù evito hag a vez lakaet en arvar gant ar flastridigezh o vont en-dro en o bro ha soñjal a ra dezhi e vez drouskouerius emzalch ur Stad a fell dezhi mirout ouzh an dud da reiñ bod da re all pa n'he deus ket graet gant an hevelep gred evit adkavout Touvier ha pa ne chom ket da dortal evit reiñ bod da dud e-giz Duvalier, Bokassa pe Khomeli.

Goulenñ a ra groñs ma vo dibrizoniet Kristen Tonnelle diouzhtu-kaer a-raok penn kentañ vakansoù al lezioù-barn ha ma vo savet-kuit an holl muzulioù tamall pe Kontrolliñ, ha ma vo lezet a-gostez ur seurt arlouperezh gant ar boliserien ha gant ar varnerien ne c'hell ket bezañ gouzavet.

BUDJET SEVENADUREL



Lenmit
al liamm
Skrivañ da al liamm
16, stared des Fours à Chaux
35400 Sant Malo
Koumanant bloaz : 150 lur
(studierien, tud dilabaour 100 lur)

KOMZOU GWIR

EDMOND SIMEONI



Evel meur a sitoan dereat e Breizh e lennan, bemdez-Doue, le Monde, ur gazetenn sirius ma 'z eus, ha Ouest-France, a zo, evel ma oar an holl, ur gazetenn "d'information". Evit an inform' hag ar lec'h all. Ur c'heliou a zo bet embannet enno o-div e deroù miz Meurzh : bez' edo Edmond Simeoni, rener meur Korsikiz, an den doujet gant an holl evit e furnez hag e gadarned, o paouez "kuitaat ha stlakañ an nor war e lec'h." Skuizh e oa aet, gouez d'an div gazetenn vrudet, gant an tabutoù dibaouez, gant dic'halloud korsikiz da labourat a-gvret, neuze, evitañ, kenavo ! Pik hag echu ! Nag un dra da vrudañ diwar-benn an den en doa lakaet ar vroadelourien da gaout 22 % eus ar mouezhioù e votadeg 1992. Diaes e vefe kavout gwashoc'h treuzisk eus ar wirionez. N'emañ ket Edmond Simeoni o tilezel ar stourm : skein a ra un taol, hag ur mell taol, war an daol. An teir frazennad meneget gant Ouest-France, troc'het tammoù diouto war ar marc'had, n'int nemet un dister a dra en un Diskleriadur a zo ennañ 163 linennad. Hag o tennañ, eme Edmond Simeoni, "d'un

tabut n'eo nemet un dister a dra dibouez e red an Istor". Kavout a ran a-bouez treiñ un tamm bennak eus an Diskleriadur-se, n'eo ket hepken evit lakaat reizh an traoù, met ivez evit lakaat ar Vretoned da brederiañ. "Evidon-me, a skriv Edmond Simeoni, a chomo feal d'ar pezh am eus embannet a-hed va buhez-stourmer hag, anat eo, d'ar pezh am eus sinet e 1992 ; a-du e choman gant ar re a zo o c'houzañv diwar o oberoù brogar ha dreist-holl gant ar brizonidi bolitikel hag o familhoù, mennet on da vat da stourm gant va holl nerzh a-enep d'ar sistem hag a zo, en hor bro koulz hag e-maez hor bro, oc'h ober diouzhomp estrenien war hon douar, d'en em gannañ outañ betek ma vo trec'het, rak a-enep-krenn emañ, en hor bro-ni, d'ar frankiz, d'an demokratelezh ha d'an doujañs a zleer da vab-den. Emaon o vont 'ta da zerc'hel, el lec'h m'en em gavan, gant va labour foran, dre an doareoù ha war an tachennoù diouz ha dibab, un dibab renet gant va c'houstañs ha gant ar mennoz demokratel, peoc'hel, dengarel, digar ha sokial am eus eus mad va bro. Niverus omp dija gant

ar seurt menozioù, ha niverusoc'h e vimp c'hoazh warc'hoazh. Hep ober trouz, gant pennegezh ha pasianted, emaoamp o prientiñ degouezhioù pouezus all, ur youl hepken ennomp : selaou, kenrannañ, stourm ha sevel, klask kendrec'hiiñ. Mirout a ran va fiziañs e dieubidigezh ar bobl gorsat - Korsiz a orin ha Korsiz diwar zibab - hag e dieubidigezh ar Vroad adkavet ganti he gwirioù. Kompren a ran mat pegen diaes e vo reiñ en-dro d'ar gerioù o ster gwir, kemmañ an doareoù-soñjal hag an doareoù-bevañ, ha dreist-holl lakaat doujañ en-dro al labour, skiant an dleed, an diorroadur-mat, an onestiz, an doujañs d'ar re all hag ar Gwir. N'eo nemet ma senter ouzñ kement-se e c'hella Korsika chom bev : ha gouzout a ran-me e trec'ho Korsika, e vevo Korsika, e vevo dieub hag a-benn ar fin deut da vezañ hi hec'h-unan-en-dro. Evit ar mare ne zisplegin netra all ebet." Setu aze ar c'homzoù n'int ket bet meneget gant Ouest-France ■

Per Denez

SKIANT-FALTAZI O TONT DA WIR

AR SKIN DALLUS


E meur a stad eus Aozadur an Emglev Norzh Atlantel (NATO e saozneg) ez eus burevioù studi evit an arme hag a zo o labourat war ur fuzuilh-laser gouest da zallañ da vat an enebourien. Da vat, da lavaret eo betek fin o buhez.

Gwelloc'h marc'had, evit doare, e vefe neutrallet er c'hiz-se an tropadoù gant ar skin laser eget gant armoù klasel. Stingray pe Outrider eo anv ar raktres-se. Penaos ez a en-dro ? Ur skin laser a zo tennet gant ur fuzuilh ispisial. Ar skin-se, tizhet gantañ ul lagad enebour bennak, a vo fokalizet e energiezh war foñs al lagad. Ha distrujet e vo e skramm-lagad d'ar paour-kaezh soudard. Da vat Dall da viken e chom an den. Gouest ivez ar fuzuilh-se da zallañ ar sistemoù pellvuuzulian optek.



teufe armoù a-seurt-se etre daouarn ar sponterien hag an dorfetourien ordinal. Armoù-dorn, anvet Cobro ha Dazera, da bal dezho dallañ an dud, a vefe bet krouet dija evit an US Army. Evel-just, ne oar den diwar an armoù-se : hervez aozadurioù ofisiel an arme en USA koulz hag e Breizh-Veur, n'eus tamm imbourc'h na tamm raktres ebet a dennfe da hevelep armoù. John Alexander, rener ar programoù evit an armoù nann-mavel, el Los Alamos National Laboratory, a lavar groñs e vefe argaset armoù a-seurt-se gant broioù sevenat ar c'hornog, abalamour ma 'z afent a-enep da briñsipoù diazez ar moral. Ur c'hargad uhel eus Minister an Arme e Breizh Veur en deus lavaret ne oa ket e soñj e vro prenañ hevelep armoù. Tud a zo ha ne gredont ket er c'homzoù vras-se : en o zouez, ar jeneral Bengt Anderberg, a zo e-karg eus budjed Arme Bro-Sveden, hag en deus skrivet ul levr diwar-benn an armoù da zallañ ■

N'eo ket skiant-faltazi. Implijet e oa bet, sañset un arm a-seurt-se gant ar Royal Navy e-pad brezel ar Inizi Malouat, ha diskaret er mod-se tri c'harr-nij eus Bro-Archentina. Ne'chet eo ar Groaz Ruz Etrebroadel ha diwar he c'houlenn ez eus bet savet un danevell, 370 pajenn enni, gant ar C'helenner Myron Wohlbarst, medisin an daoulagad, eus Skol Veur Duke, er Stadoù Unanet. Goulenn a ra ar Groaz Ruz e vefe forbannet hevelep armoù, rak gant e teufe an dud da vezañ dall da viken. Aon a sav enni ivez e



1. Ar skin laser o tizhout al lagad.
2. Fokalizet eo ar skin gant ar skrin.
3. Distruj a va foñs al lagad.

Filip Oillo

SPAGN

Daoust d'ar pezh a c'heller krediñ n'eo ket e Katalonia an hini a vez an dregantad brasañ a dud o komz yezh ar vro e-skoaz ar c'hatalaneg, e Galisia ne lavaran ket. Rak kalz unvanoc'h eo poblañs Galisia a-fet orin, eget hini Katalonia, m'emañ an hanter eus an dud o tont a ziavaez ar vro ■

KURDISTAN

Ur stourmad a zo krog bremañ evit ma vo skarzhet Turkia eus Kuzul Europa, pa ne zoug tamm ebet da wirioù Mab-den, e Kurdistan pergen. Degaset e vez da soñj ez eus bet distrujet 874 kêriadenn da nebeutañ (sifroù 1ñ a viz Mezheven) e Kurdistan, ha digêriadeget o boblañs, lazha-deget un niver bras a dud, dilennidi ha kalaouennerien e o zouez, harzet kannaded ha lakaet miliadoù a dud da dec'hel diouzh o douarou, holl en anv ar stourm ouzh ar sponterezh.

Anavezet mat eo an darvoudoù-se gant gouarnamantoù Europa ha koulskoude ne reont ket kalz a van eus klemmoù ar Gurded. Gwir eo eo gant armoù Bro-C'hall, Alamagn h.a. an hini e vez gwasket ar Gurded.

Goude lazhadegiñ an Armenianed e penn kentañ ar c'hantved, skarzhañ ar C'hresianed o chom en Anatolia er bloavezhioù ugent, emañ ar pal gant Turkia strewiñ an holl Gurded dre ar vro hag ober eus o riez ur vroad unvan, ma ne vo nemet Turked ken. War a hañval ez eo doareoù degemerus da Stadoù all Europa pa gendalc'hont da genlabourat gant Turkia e Kuzul Europa hag e NATO ■

Herve Kerrain

TURKI

Kannaded ar Gurded mouget

Divodet eo bet an DEP (strollad an demokratelezh, eus Kurdistan) gant Lez Bonreizh ar Republik Turk, ha roet urzh gant Prokolor Meur Lez-Varn Surentez ar Stad da zerchel 13 kannad ar strollad

dindan evezh ar bolis, kollet ganto, emezañ, o didamallusted kannaded; 5 kannad a oa bet bac'het e miz Meurzh endeo, ha barnet e vint evit an delzioù e sigur "disran-nouriezh" ha "sevel a-enep da unvaniezh ar stad". 6 kannad all zo repuet e Brussel, ha 2 all, Selim Sadak ha Sedat Yurttas, zo en em sparlet e ti ar Breujoù en Ankara.

13 kazetenner barnet

Tamallet e vez da 13 kazetenner eus ar pemdeziek kurdek "Ozgur

zivout arver ar galleg d'al Lun 13 a viz Mezheven. Ober gant ar galleg a vo ret da gemenn pe da ginnig marc'hadourezh pe labour, er bruderezh komzet pe skrivet ■

LATVIA

emglev a-zivout emdenadenn an armeoù rus

A-benn an 31 a viz Eost e vo aet kuit an 12000 soudard rus a zo eno c'hoazh.

Un emglev zo bet sinet gant Boris Yeltsin ha Guntis Ulmanis evit ma emdenno an holl soudarded rus o chom c'hoazh war zouar Latvia.



"Gudem", bac'het abaoe miz Kerzu, "oberennoù a zisrannouriezh", bezañ izili eus ar PKK, strollad labourerien Kurdistan, ha kenlabourat gant o oberennoù. Goude bezañ distailet o anzavadennoù sinet dre heg o deus lavaret ar gazetennerien e oa ur prosez politikel a veze graet dezho dre ma embanne o c'hazetenn testennoù a-zivout penaos e vez gwallgaset gwirioù Mab-den gant ar stad turk ha penaos e vez treuzdouget poblañs kurd gevret Turki davet rannbarzhioù all ■

BRO-C'HALL

Lezenn ar galleg

Degemeret eo bet gant ar Vodadenn Vroadel ar rakleznenn a-

Mark Kerrain

MAKEDONIA

N'eo ket bet degemeret gant Lez Europa Luxemburg ar goulenner-berzh Kumuniezh Europa da lakaat harz war blokez Bro-C'hres ouzh FYROM, Republik Makedonia Skopje. Ne dalv ket avat e ro al Lez ar gwir da Aten da ganderc'hel gant ar blokaz hogen ne fell ket dezhi kemer un diviz diwar hast, ha mennaet eo da sellout a dost ouzh an tabut ... ha da gemer he amzer.

Herve Kerrain

STADOU UNANET

English spoken only

Ur gompagnunezh eus Kalifornia zo bet aotreet gant Lez Uheleñ ar Stadoù Unanet da c'houlenner groñs digant hec'h implijidi komz saoneg hepken en o labour.

Klemm a oa bet savet el lez-varn gant daou implijad eus ar Spun Steak Co, ma labour un 30 spagnoleger divyezhek, dre ma 'z ae o c'hompagnunezh a-enep d'al lezenn a zifenn an droukzi-forc'hañ en abeg d'an orin broadel.

Gounezet ganto ar varn gentañ, gwir a oa bet roet d'ar gompagnunezh gant al lez-engalv dre ma 'ne c'houzañv ket an implijidi o vezañ ma komzont an div yezh". Ar varn-se eo a zo bet kadarnet gant al Lez Uheleñ ■

PINOCHET

Augusto Pinochet, bet unan eus krisañ diktatourien Kreisteiz-amerika, n'eo mui nemet penn bras an arme e Bro-Chili.

Erruet e oa "incognito", dilun 30 a viz Mae, e Praha, pedet ma oa gant ar gompagnunezh gwerzhañ-armoù Omnipol d'ober ur veaj-studi evit arme Chili. E penn kentañ miz Mezheven eo bet o weladenñ marc'hadourien armoù e Bro-Suis ivez.

N'en deus ket gallet, siwazh, dont d'ober e varc'had d'ar saloñs Eurosatory e Paris, e-lec'h ma vez Matra, Thomson, ar GIAT hag all o tiskouez bleunioù koantañ ar sevenadur gall ■

Mark Kerrain

ENDRO

Ar reolioù gwarezioù etrevroadel a-fet skinoberiantiz a oa da vezañ strishaet e diabarzh ar C'hengor Etrevroadel Evit ar Gremm Derc'hanel (IAAE).



En emvod ar C'hengor-se e Wien d'an 10 a Vezheven e oa da vezañ adwelet "ar reolioù diazez a skinwarezioù" da dalvezout evit an holl stadoù ezel eus ar C'hengor-se, a zo e garg lakaat urzh e kement tra a sell ouzh ar gremm derc'hanel dre ar bed.

Hogen abalamour da Vro-C'hall n'eo ket bet degemeret ar reolioù nevez-se, ha bremañ e vo ret gortoz un tamm mat amzer a-raok ma vint. Anv a oa da lakaat da


dremen ar vevenn evit ar gevredig eus 5mSv/bloaz da 1mSv/bloaz, hag evit al labourerion eus 50mSv/bloaz da 20mSv/bloaz. Ar Sievert (Sv) eo an unanenn a dermen gweredoù bevoniel ar skinoberiantiz war an organeg.

Ret eo kompren e oa bet termenet ar reolioù nevez-se goude pevar bloaz a varc'hata. Un destenn diazez a oa bet savet hag arouet gant 127 arbennigour a bep seurt bro, 6 gall en o zouez. Souezhet-bras e voe an holl eta pa zisklerias kannad Bro-C'hall en emvod an IAAE e Wien ne oa ket Pariz evit sinañ an destenn abalamour "d'un diforc'h a briziañ e diabarzh ar ministrerezhioù gall."

Aon o deus ebetel an derc'hanel e Bro-C'hall ne lezfe ket ar reolioù nevez-se, re izel ma'z int d'o mennozh, a-walc'h a aezamant da frealziñ ar boblañs en un darvoud derc'hanel bennak. Ouzhpenn-se o deus aon e vefe broudet stadoù zo en Europa, Luxemburg, Denmark, Gres pe Iwerzhon dreist-holl da strivañ evit izelaat pelloc'h c'hoazh ar reolioù-se.

Koulskoude n'emañ ket a-unan an arbennigourien e Bro-C'hall o sevel a-du gant diviz Pariz. "En arvar emaoamp a goll hor c'hred bet savet a-drugarez d'hor politikerezh a sklaerder," eme un uhelgardiad eus EDF, c'hoant gantañ chom dianav e anv ■

Herve Kerrain



PLAS AR C'HORSIKANEG EN EMBANNADURIOU HAG ER MEDIAOU


Ur pennad skrid a-bouez a zo bet skrivet, nevezik 'zo, gant Jackie Lucchini, er gazetenn "La Corse", hag an talbenn anezhañ 'livre en Corse : la chute'. Klask a ra ar c'hazetenner-se kaout diskleriadurioù war an enkadenn-se. Risklus e vez ordinal keñveriañ an traoù. Padal ez eo dedennus-tre evit ar vrezhonegerien, poelladurioù ar C'horsiz war stad o yezh. Al lennerien e Korsikaneg a ya war vihanaat, evel ma vez krignet muioc'h mui sevenadur orin ar vrose. Neuze eo gwelloc'h evit ar c'hounid evit un embanner en enezenn-se pa vez gwerzhet levrioù gallek gantañ evit re e

grat netra evit hen diskouez.
Ar skrivagner korsat, Santu Casanova, er c'hantvet tremenet, a skrive : *"Morta e volonta, morta a lingua dunqua mortu u populu"*.¹⁾ Ur ger evit echuiñ. An aotrou Toubou, ministr gall ar sevenadur hag ar "gallegva"²⁾ mar plij, a fell dezhañ difenn ar galleg met ar brezhoneg pe ar c'horsikaneg n'o deus nag al lezenn nag institusionoù ganto. Mat e vefe d'ar vrezhonegerien sevel an diviz eus ar seurt-se kenetrezo. Kozh-poent eo ■
Yann Ar S.

- 1) Kazetenn bemdezlek "Le Corse, le Provençal". D'an daou a viz Mae 94
- 2) d'ar gwellañ, daou c'hant skwerenn a vez gwerzhet well-wazh e korsikaneg hervez Christian Peri (gw. "Etudes Corses" nivrenn 38 Bloaz 1992)
- 3) an evezhiadenn-se a zo bet graet ivez gant Pascale Marchetti (gw. e levr "La Corsophonie" p. 200 betek 203)
- 4) da skouer "U dettu di l'etima" ur vilhetenn gant Ghjiseppu Sicurani e "Corse Matin", pep Meurzh. Setu tout.
- 5) abaden ar Sadorn anvet "Da qui" (ac'haleman) hag a bad ugent munutenn
- 6) evit Scola Corsa (par da Skol an Ensav) n'eo ket bet graet kalz gant an emvodadur rannvroel (gw. "Corse Matin" 22/4/94)
- 7) ur yezhadour korsat
- 8) embannet eo bet ur pegsun gant Scola Corti "o ma palarmi Corsu" o l mamm komz din e Korsikaneg. Scola Corsa a zo bet krouet e 1972 gant Jean-Baptiste Stromboni diwar skwer Skol-Vreizh
- 9) ur skrivagner korsat
- 10) "me a zo korsad ha lor'h ennon"
- 11) "marv ar youl, marv ar yezh, ha neuze marv ar bobl"
- 12) gw. Per Denez a ziklerie gant goapezhe e Roazon d'an 12 a viz Genver 1992 : Sevenadur gant un "S" bras (un grand C puisqu'il s'agit de la culture française). Sonjñit, d'ur ministdi eus an "alamanegva".

PENAO NEUZE STOURM OUZH AN ENKADENN ?

Evit darn, an diskoùl ma c'heller kaout er skol met n'eo ket trawalc'h. N'eo ket da gaoù tout kennebeut digant ar stad, ar Rannvro pe an Departamant. Paul-Marie Agostini⁷ a skriv "Diskargañ n'hellomp ket war ar skol. Ne c'hell Korsad ebet klemm an droed evit ar yezh da vezañ kelennet ma ne gomz ket Korsikaneg d'e vugale ha ne vroud ket anezho d'ober ganti en o zro."⁸ Jean Dominique Seta⁹ a ziklerie ivez : *"ne dalv netra lavarout "Eiu so Corsu e mi ni vantu" ma n'eo*



RADIO

Selaouit "Trouz ar Moc'h" abaden Gweltaz Adeux (E.V.) bep Lun da 9e 30 noz, ha bep Sadorn da 6e noz. Abaden gouestlet da sonerezh rock ar bed a-bezh ! War Alternantes FM 98,1 (Bro-Naoned) ■
Ne vo ket a abaden vrezhonek e-pad an Hañv war Radio an Arvor (93,1 FM) d'ar Yaou noz. Ne vo skignet an abaden nemet diouz ar Sadorn kreisteiz war "Radio Glas" (gwagennoù Etre - 71.1 Mhz). (Etre 12e ha 2e g.k.). Posubl eo skrivañ evit pep abaden lemet kuit, d'an dud e karg. Tele pe radio. Kartennou-post da renezh pep radio pe chadenn skinwel. Peadra zo ! Vakañsoù mat d'an holl ! ■
Beg spilhen

U.D.B.

Diskleriet en deus Herri Gourmelen, "mouezh" Unvaniezh Demokratel Breizh e rofe e zilez eus e garg e kendalc'h ar strollad-se en diskar-amzer. Fellout a ra da Herri Gourmelen reiñ e amzer da Gourenn U.D.B. Sant Maloù, e-lec'h m'eo kuzulier kër.

LEVRAOUEG BREIZH AR C'HENTAÑ LEVRAOUEG E BREZHONEG NEMETKEN

Laouen omp o kemmañ d'an holl vrezhonegerien eo bet krouet LEVRAOUEG BREIZH, al levraoueg nemeti gouestlet d'ar brezhoneg da lavaret eo d'al lennegezh ha d'ar sevenadur brezhonek, an hini nemeti ma vez labourer e brezhoneg, an hini nemeti ma vez degemeret an dud e brezhoneg.




E PELEC'H EMAN STALIET ?
Evit poent, e KOMMANNA, 12 straed Penn ar Wern - 29450, e savadurioù Ensavadur Breizh (pgz. 98 78 09 34, plr 98 78 09 30).

EVIT PIV ?
Evit nep a zo dedennet gant al lennegezh vrezhonek, al levrioù pe an enrolladurioù en hor yezh pe a-zivout hor yezh (Digor ha foran e vo ar servijoù a-benn un nebeud mizioù).

PENAO EMEZELAÑ ?
Tri liv a zo :
- Izili ordinal hag a c'hello lenn hag amprestih hervez reolennoù al levraouegou foran.
- Izili oberiant barrek war al levraouegou pe war ar skridoù brezhonek, hag a gas Levraoueg Breizh war-raok.
- Izili vadoberiant dre m'o devo roet skoazell arc'hant a ra diouer bras evel ma c'hellit krediñ.

PENAO E VO KREñVAET LEVRAOUEG BREIZH ?
Dre strivoù ar vrezhonegerien, gant harp ar strollegezhioù lec'hel (ha

gant ar stad c'hall, mar bez lakaet da gompren n'eo ket ar galleg ar yezh nemeti er republik). Heuliet e vo reolennoù ar vicher dindan evezh renerien levraouegou all. Meur a embanner o deus asantet kas pep a skouerenn eus o levrioù pe gazetennoù a zo bet pe a vo embannet. Un toullad levrioù ha gazetennoù a zo bet roet gant tud ha kevredigezhioù ha deoc'h-chwi eo da reiñ ho skodenn ivez evit sevel ho levraoueg.



pediñ d'ur banne digor-kalon a vo evit digoradur al levraoueg d'ar yaou 21 a viz Gouere 1994 da 11e 30 e savadurioù Levraoueg Breizh.

Levraoueg Breizh a zo laouen d'ho Isabelle Araujo

MEUR A LEC'H A ZO E BREIZH MA C'HELLIT DEGAS HO LEVRIOU WAR ANV LEVRAOUEG BREIZH

- KOMMANNA**
E sez Levraoueg Breizh 12 straed Penn ar Wern - 29450. Bez' e c'hellomp dont da gerc'hat ho levrioù, pellgomzit evit goulen 98.78.09.34.
- KEMPER HA LANDIVIZIO**
E Levraoueg Penn ar Bed en daou lec'h
- Kemper, 12 straed Turgot (e-kichen "Direction départementale des affaires sociales") pgz: 98.95.88.12
- Landivizio, 26 straed Chateaubriand pgz: 98.68.08.18.
- BREST** (Ar Releg-Kerhuon)
Embannadurioù. An Here, 15 straed Gay-Lussac - 29480 (stok ouzh skolaj Diwan) pgz: 98.28.10.37.
- ROAZHON**
E sez Bremañ, 8 straed Hoche - 35000 pgz: 99.38.75.83.
- SANT-BRIEG** (Plerin)
Levraoueg Aodou an Arvor, ball Chalutier Le Forban 22190 Plerin pgz: 96.74.51.05
- GWENED**
Levraoueg Morbihan, straed Montaigne, Kercado - 56000 pgz: 97.63.99.30
Levraouegou stag ouzh Levraoueg Morbihan:
- KAODAN** (E-kichen An Oriant)
Z.I. Kergont - 56600 pgz: 97.81.11.03 (pellgomzit en araok)
- NOAL-PONDI**
Ball Liberation - 56 920 pgz: 97.38.31.03
- GWENRRANN**
E ti Lorañs Motrot, Kergonan (Hanter hent etre St Levarzh ha St Andre ar Douerier) - 44350 pgz: 40 61 97 02

Lec'hioù all a vo kinniget deoc'h a-benn nebeut.

NA C'HORTOZIT KET RE BELL ! KLASKIT LEVRIOÙ HA KAZETENNOÙ, GOULENNIT REOÙ DIGANT NEP NA RA TRA GANTO HA KASIT-I HEP DALE

STUMMAÑ PRODUOURIEN FILMOU AR WAREG ATLANTEL gant sikour Europa 7 Breton e Morgad

Evit sikour industriezh ar sellet-ha-klevet ez eus ur programm europat, MEDIA e anv, 19 rann ennañ. EAVE (Embregerien ar Sellet-ha-Klevet Europat) a zo unan anezho, e bal stummañ an dud-se ha krouiñ ur rouedad etre ar broioù emren, ar chadennoù skinwel hag an "divizourien".

Ar staj azoet gant EAVE e Morgad (24-28/05) a oa an trede eus ur c'helc'hiad a beder sizhunvezh-stummañ, goude A Coruña ha Kerzid hag a-raok Lisbon. Gouestlet da vroioù bihan eus ar "Wareg Atlantele" (Breizh, Galisia, Portugal, Kembre), azoet (mat) amañ gant Daoulagad Breizh ha skoazellet gant ar c'huzul rannvro hag an DRAC. Un ugent a dud bennak a gemere perzh ennañ, 7 anezho eus Breizh. En o zouesk, Nona Barazer eus ACAV S. Kadou, gantañ ur raktres heuliad video evit kelenn brezhoneg d'ar vugale vihan. Petra en deus degaset ar staj dezhañ ?

"Da gentañ tout, adframmañ ma raktres evit ma vefe degemeret gant ar skignerien", emezañ. Diblusket e vez diruzet tout ar raktresoù gant ar skipailh stummerien, arbennigourien an holl anezho, desket e vez d'ar berzhidi c'hwennat ha difenn o mennadoù, e saozneg penn-da-benn mar plij. Gant Barazer hag e genseurt Daniel Rouyre eus Dock Ouest e Gwened eo bet meulet live uhel ar stummadur, spered kenlabour ar staj hag ar fed ma vez krouet eno ur "rouedad" etre an holl dud e-kerzh ar c'helc'hiad. Rouedad, kenskoazell, darempredoù, setu ar gerioù a zeue gant an holl dud goulenmataet gann.

Hag ezhomm bras ez eus eus ar rouedad-se evit talañ ouzh galloud ar sistem gall, deskiñ produiñ gant broioù estren ha tremen hebioù Paris, eme M.F. Mascaro, rener euz EAVE evit Bro-C'hall. Kondaonet gant an holl sistem kreizennet Bro-Frañs, evel gant Pamela Hunt, eus Kembre, a gav spontus stad an traoù er vro-mañ, e-keit m'emañ BBC ha Channel 4 o tigrezennañ o lec'hioù-labour. Memestra 'vez klevet digant P. Meyer, kuzulier Rannvro : daoust d'ar Stad bezañ brasañ poster arc'hant e-keñver

N'eo ket tout gouzout sevel filmoù. A-dreñv ar sevenere e rank bezañ ar produour(ien), a oar sellet pizh ouzh ur raktres-film, dirouestlañ sistem ar gwirioù, aozañ ur budjed, gwerzhañ ha dasparzhañ ar film war-lerc'h.



sevenadur e Breizh (150 milion a lurioù), n'eo ket digreizennet da vat ar yalc'hadoù-se, nemet dilec'hiet. N'eus ket a youl vras kennebeut gant ar bolitikerien, a vez spontet buan gant koust sevel ur servij sellet-ha-klevet. Hervezañ koul-skoude e vefe ret ur raktres mat a-raok soñjal en arc'hant, dreist-holl d'ur mare m'emañ France 3 o soñjal troc'hañ he budjedoù kenbrodiñ. Poent e vefe ivez lakaat an dud da gompren ez eo liammet start ar sevenadur hag an ekonomiezh. Pouezañ war ar bolitikerien zo ret

ivez, rak e-barzh ar sistem gall ez omp kondaonet da gaout hon arc'hant eus Paris evit ur pennad mat c'hoazh.

PETRA OBER NEUZE ?

Hervez Erwan Moalic eus Daoulagad Breizh ez eus bremañ ur rouedad a dud kappal e Breizh. O vezañ m'eo treut ar chañsoù da vezañ skignet e Bro-C'hall, ret eo digeriñ ar prenester war Europa a-bezh, war ar broioù bihan par d'hoen hini peurgetket. Bezañ Europeaned da vat. Pa vez goulennet gant an dud pezh a soñjont diwar-benn sevel ur chadenn er vro avat, n'eo ket gwall sklaer menoz ar braz eus ar stajidi vretonek. Evit ar C'halianed, ar Bortugaliz hag ar Gembreiz ez eo kalz aesoc'h an traoù avat. "Evit gounit ar chadenn-se e vo ret tenniñ ar c'heizennerezh en ur gizidikaat gallegerien Breizh war pouez seurt chadenn ha lañsiñ obererezhioù evel nac'hañ paeañ an taos, evel e Bro-Gembre pemzek vloaz 'zo", eme B. Hunt. "War am eus gwelet amañ", eme Bepe Coira, rener ar "Centro Galego de artes da Imaxe", "brasañ kudenn eo an diouer a skinwel rannvroel. Du-mañ ez eo chadenn skinwel Galisia hor brasañ pourvezour labour. C'haont bras am befe da genlabourat gant ar Vretoned ha da welet filmoù Breizh e Galisia."

Setu dre vras santimant an holl berzhidi : ur sizhunvezh frouezhus evito, darempredoù liammet da vat etrezo hag ivez gant an divizourien, ur youl mont pelloc'h, brasaat. Evel ma lavar Roland Savidan, brezhoneger nemetañ ar skipailh : "amañ 'm eus desket penaos dastum arc'hant hag em eus kavet darempredoù mat". Ma, chañs vat dezho ha d'ar Vretoned all o dije c'hoant en em stummañ war ar vicher brodiñ. Arabat huñvreal memestra : budjed hollek ar program MEDIA a dalv 3 devezh eus budjed ar PAC 1 (F. Maupin, rener euz burev Paris MEDIA). ■

Kristian ar Braz
Titouroù : E. Moalic, Daoulagad Breizh, 29, Siraed ar Rosmeur BP 206 29172 Douarnenez Cedex - Pgz. 98 92 97 23 - PIR 98 92 28 10

Ur Chadenn en Iwerzhoneg

Er pennad-kaoz a vo kavet da heul e ro Bob Collins - Rener Darempredoù RTE ha bet rener ar Programmoù e soñj diwar-benn ar chadenn a vo krouet e gouezeleg, hag ivez war stad ar brezhoneg en tele.

Ar chadenn nevez : gellout a rafec'h displegañ dre vras penaos ez aio endro ?

Hervez ar raktres e vo skignet teir eurvezh bemdez adalek an derou. Sañset e vo digoret a-raok fin 1995 pe penn-kentañ 1996, d.l.e. abenn 2 vloaz. Arc'hantaet e vo ar chadenn gant ar Stad. N'eo ket bet lakaet resis c'hoazh e peseurt mod e vo graet, na pegement a arc'hant a vo roet gant ar Stad. Diaes e vo. N'eo ket gwall vat ar gouarnamantoù evit reiñ arc'hant mod-se. Met un dra zo sur : ret e vo d'ar chadenn krouet arc'hant a-walc'h. Mod all, ne dalv ket ar bon sevel anezhi. Ma ne vez ket kenkoulz mat ar programmoù hag ar re all, ne vo ket sellet outo gant an dud. N'eo ket dre santimant e vez sellet ouzh programmoù en iwerzhoneg, na dre ma vezer tomm ouzh ar yezh. Ne sello an dud outo nemet mard int mat. Hag e-barzh pep ti en Iwerzhon o do an dud da zibab etre programmoù dishenvel. Setu, dav e vo d'ar programmoù iwerzhonek bezañ kenkoulz hag ar re all e saozneg, ma n'eo ket gwelloc'h. Lakaet e vo ar pouez war ar

yaouankiz, peogwir, evel m'hon eus lavaret damañk, se zo un dra pouezus-kenañ. Klasket vo ivez krouet un dibab ken ledan ha ma vo posupl. Mont pelloc'h eget ar re a ra gant an iwerzhoneg bemdez pe ar re a ra war-dro an emsav evit ar yezh, davet pep hini. Dedennus e vo ar programmoù evit tout an dud.

Fiziañs hoc'h eus e dazont an iwerzhoneg ?

Ya, kalz muioch eget ma 'm boa un nebeud bloavezhioù zo. War ar riblenn emañ, marteze evel ar yezhoù keltiek all pe yezhoù all dre ar bed. Mont-dont a ra ar yezhoù, 'm eus aon. Lod a varv. Dre chañs, an iwerzhoneg zo bev c'hoazh. Ne soñj ket din ez aio da get. Nerzh a-walc'h en deus, a soñj din, pa soñjan e tout an dud a ra gantañ evel yezh-vamm hag er re a heuilh bremañ skolioù iwerzhonek, pe ar re en em lak d'ober tra-mañ-dra en iwerzhoneg. Evit an holl re se e vo ar servij skinwel un dra bouezus-tre. Kalz muioch 'a fiziañs em eus bremañ eget a-raok.

Gouzout a rit e peseurt stad emañ ar brezhoneg e-barzh an tele ?

Ya, siwazh... D'am soñj e vo tro ar Vretoned bremañ. Ar re gentañ oa ar Gembreiz, war-lerc'h ar Skosis gant CTG bremañ eo deuet tro an Iwerzhoniz gant Telfis na Gaelige. A-raok e oamp c'hoantus en Iwerzhon pa wlemp tout an traoù a c'hoarveze lec'hall e-keñver er vro-mañ. Met bremañ ec'h esperomp tout e vo posupl da grouiñ traoù e Breizh.

Petra a c'helfe ober RTE evit sikour ar Vretoned, dreist-holl evit programmoù evit ar vugale ?

Poent bras eo e vefe krouet gant ur c'henlabour sirius etre ar broioù kelt. Daou dra zo bet azoet gant ar "Celtic film association" : warlene e S. Jakez a C'halls hag ar bloaz a-raok e Montpellier, e Kenlabour gant tud Burev Europa ar Yezhoù Bihan : lakaat an dud da studiañ asambles penaos kenbrodiñ traoù, dreist-holl filmoù evit ar vugale hag evit ar grennarded. N'o deus ket graet kement a verzh hag em bije karet, met ur gammed etreke ar pal e oa, memestra. Met, gant emdroadur Telfis na Gaelige, S4C e Kembre ha CTG e Bro-Skos, bremañ e rankomp kreskiñ unanet. Gouzout a ran, n'eus ket moaien d'en em gompren gant ar yezhoù-se, nemet etre iwerzhoneg ha gouezeleg, peotramant an disterañ etre kembraeg ha brezhoneg, met ret eo deomp kaout hentoù, sevel strategiezhioù nevez evit bezañ gouest d'en em skoazellañ, gant ar pal sevel programmoù, dreist-holl evit ar vugale, peogwir ar vugale zo digor, ne renkont ket an abadennoù e rummadoù resis, laouen int da sellout ouzh traoù e forzh peseurt yezh... Setu ar pep pouezusañ evit an dazont. Ha dres diwar ar savboent-se e vefe moaien da reiñ lañs da Vreizh : kemer perzh en emdroadur a zo o tigouezhout er broioù keltiek all, a c'helfe marteze lakaat e plas an diazez ma vefe tro da sevel traoù warnañ ■

K. a. B.

GOUEL SINEMA DOUARNENEZ

"Pobl Breizh hag ar Poblou Berber" e vo danvez 17vet Gouel Sinema Douarnenez a vo dalc'het etre an 21 hag an 28 a viz Eost.

Gouzout hiroc'h diwar-benn Poblou Berber hanternoz Afrika a vo tu deoc'h ober o tont da zizoleañ un dou-gent a filmoù : filmoù ijin ha kelaouiñ, filmoù video, filmoù kozh eus mare an tavadennoù gall, filmoù a-vremañ - en o zouez ar film kentañbet savet e "tamazight", yezh an Douareg.

Tri devezh staj a vo ivez, evit deskiñ muioch a draoù diwar-benn ar Verbered, war-dro dek milion a dud o chom e Maroko, Algeria, Libia, Mali ha Nijer. Diskouezadegoù ha sonadegoù a-hed ar sizhun - ur fest-noz d'ar gwener 26 hag ar strollad Tayfa d'ar Sul 28 a viz Eost ■

Titour hag enskrivañ d'ar staj • 98 92 09 21 pe 98 92 97 23
Diwallit ! Skriavañ a-raok ar 1añ a viz Eost.



DESKIÑ BREZHONEG HA STUMMAÑ KELENNERIEH

Un nebeut soñjoù diwar-benn un devezh stummañ evit ar gelennerien brezhoneg.

Un hanter devezh diwar-benn ar stummañ kelennerien brezhoneg, setu ar pezh a oa bet aozet d'an 19 a viz Meurzh gant Sylvie Vigouroux en anv Park an Arvorig e Menez Meur. Pedet e oa bet Mark Kerrain, kelenner e Roazhon, da zont da ginnig e hentenn deskiñ "Ni a gomz brezhoneg", hag un ugent bennak a dud a zeuas d'e selaou.

Displeget e oa bet gant Mark Kerrain pal e hentenn, ha petra a vez kavet enni. Evit deskiñ brezhoneg e vez lakaet ar skolidi da selaou ur c'hasedig, da adlavaret ar pezh o deus klevet - ha pa n'o defe ket komprenet -, ha da gomz - en ur respont d'ar goulennoù da skouer. E pep hini eus kentelioù an hentenn-se e vez kavet pennadoù kaoz berr a c'hell

bezañ c'hoariet gant ar skolidi. Diskouezet en deus Mark Kerrain penaos e kas e gentel en-dro en ur zisplegañ mennozhioù evit lakaat ar skolidi da gomz (dre c'hoarioù hag all) pe evit kelenn ar yezhadur.

Plijus e voe an devezh : ezhomm a vez eus seurt traoù gant ar re zo evel don o kelenn ha n'eo ket o micher, ha n'o deus ket kalz a skiant-prenet war an dachenn. Ur soñj brav e oa an devezh-se ha mat e oa e gas da benn. Dipitus em eus kavet koulskoude ne vefe ket bet tu d'en em gavout a-gevret war-lerc'h, o c'h evañ ur banne, evit ober anaoudegezh gwelloc'h gant kelennerien all hag evit eskemm mennozhioù war ar pezh a vez graet el lec'h-mañ-lec'h. Da Bark an Arvorig e oa marteze da brientiñ un tammig gwelloc'h an degemer en ur c'horn rouez an tavarnioù tro-war-dro.

Ur soñj all a oa deuet din ivez, evit lakaat da anavezout an doare-mañ-doare da gelenn. Start e vez d'ar c'hevredigezhioù breizhek kavout tud prest da gelenn brezhoneg, ha pa vezont kavet ne vez nag amzer na tu alies d'o stummañ. Mat e vefe bet neuze filmañ an devezh-se war bandennoù video evit bezañ gouest da ginnig traoù bev ha plijus da zanvez-kelennerien nevez, traoù a c'hellfe o sikour. Ha se hep kaozeal eus an dud o dije bet c'hoant dont d'an devezh-se met n'o doa ket gellet en ober evit abeg pe abeg. Ur bazenn gentañ e c'hellfe bezañ seurt film evit un "hentenn sellet-ha-klevet" nevez a c'hellfe bezañ skignet goude-se war ar skinwel...

Hep chom re da hunvreal, spi 'm eus e vo c'hoazh devezhioù ma c'hello tud, zo o micher kelenn hag o deus mennozhioù war an dachenn-se, dont da ziskouez d'ar re o deus youl vat met hep skiant-prenet, traoùigoù da wellaet o doareoù-kelenn ha lakaat o skolidi da gaout plijadur en ur gomz brezhoneg ■

Serj an Huede

KLASOU DIWAN E TI AR VREUDEUR MORVAN

Goude bezañ dizoloet aodoù Bro-Dreger hag ar Jentilez en deus bet tro klas C.E.2/C.M. skol Diwan Naoned, e kompagnunezh o c'henseurted deus Gwengamp, da gejañ gant ar Vreudeur Morvan en o zifurm. Frouezhus eo bet an eskemm evit ar vugale o tont deus ur gêr vras, stank o goulennoù ha lemm o c'hoant gouzout hiroc'h diwar-benn ar "frioù lous" a gane 40 vloaz 'zo dja, met ivez a-zivout mont-en-dro un atant ha buhez gwechall.

Goude bezañ kanet a-stroll ha preizhet ur sachad madigoù profet dezho gant an tri breur o deus kuitaet ar vugale atant Botkol, hogen koun an endervezh-se a vano don en o memor.

Gaëtan Boullig



Seziz a zo lakaet war Youn evit kaout ur skrid diwar e zorn.

STAJOU HANV



Stajou Hañv gant An Oaled

■ Ar pep brasañ anezho a vez kinniget d'ar vugale a ra gant ar brezhoneg en un doare ordinar. Lod a vez dalc'het e Treglonou (Ar Re Vihan, Arzoù ha Sportoù), lod all e Landelo (Natur), pe c'hoazh dindan deltennoù (Kayak-VTT, Natur).

■ Ur staj a vez aozet e Sant Alar evit ar vugale a zo o teskiñ brezhoneg er skolajou (10-12 vloaz). E Balaneg Uheldañ, e kreiz ar maezioù, e vo desket brezhoneg en ur c'hoari hag en ur zizoleiñ ar vro.

■ Daou staj a vo c'hoazh e Treglonou, e-lec'h ma vez degemeret bras ha bihan, familhoù ha tud o-unan evit deskiñ ha bevañ e brezhoneg. Ar stajou-mañ a fell dezho bezañ un nor digoret frank war ar vro ha war an dud a zo tro-dro (gouelioù, gweladennoù...).

Ma fell deoc'h kaout titouroù ouzhpenn e c'hellit pellgomz d'An Oaled
☎ 98 04 07 04, pe d'an niverenn-mañ : 98 48 07 56 -

Skrivañ da : An Oaled
29870 - Treglonou -

Deskiet brezhoneg gant Stumdi
12, straed Penn ar Wern - 29450 Kommanna
☎ 98 78 00 46 - Plr. : 98 78 09 30
Un Niver Stummer a zo : 53290145329

Miz	deiziadoù	nv. devezh	Lec'h	liveoù
Gouhere	18/07 - 22/07	5	Kommanna	1, 2, 3
	25/07 - 29/07	5	Kommanna	1, 2, 3
Eost	01/08 - 05/08	5	An Oriant	(56) 1, 2, 3
	08/08 - 12/08	5	Kommanna	2, 3, BaV
	16/08 - 19/08	4	Kommanna	2, 3, LU
	22/08 - 26/08	5	Kommanna	2, 3, LU
Gwengolo	29/08 - 02/09	5	Kommanna	1, 2, 3
	05/09 - 09/09	5	Kommanna	1, 2, 3
	12/09 - 16/09	5	Kommanna	2, 3, BaV
	19/09 - 23/09	5	Kommanna	2, 3, BaV
	26/09 - 30/09	5	Kommanna	3, BaV, LU

■ Un aozadur stummañ gouestlet e labour da yezh ha sevenadur Breizh.

■ Stummadur kentañ ha stummadur micher e brezhoneg ha dre ar brezhoneg.

■ Stajou digor d'an holl.

■ Stummadur arbennik diouzh ar goulen.

■ Prouadoù live digoust diouzh ar goulen.

Al Liveoù

1 : Deraouidi rik
2 : Eil sizhun an deraouidi pe deraouidi faos

3 : Tud a oar komz ha lenn un tamm (labour war an eztaolli dre gomz ha dre skrid + yezhadur)

BaV : Brezhonegerion a vihanik (labour war ar skrivañ hag etrekompren).

LU : Live Uhel (bevañ e brezhoneg ha dre ar yezh deskiñ danvezioù liesseurt : lennegezh, skiant, yezhadur...).

Stajoù

STAJ SONEREZH HA DAÑS

An 9^{vet} staj etrebroadel sonerezh ha dañsoù breizhek ha keltiek aozet gant ar greizenn sevenadurel Amzer Nevez eus Plañvour (56) a vo eus an 1 betek ar 5 a viz Eost 1994.

SONEREZH

Digor eo ar staj-mañ d'ar re a oar seniñ gant o benveg c'hoazh hag hag a fell dezho mont pelloc'h gant o anaoudegezh eus tonioù Breizh hag ar Broioù kelt.

Paliou ar staj a zo evel-mañ :
-dizoloñ doareoù disheñvel ar c'horn-broioù, deskiñ ober gwelloc'h gant ar benveg, kaout un tañva eus ar c'henc'hoari.

Kemer a rait pezh er staj ar sonerien-mañ :

-Akordeons, Yann Fañch Perroches, Biniou bras, Bernard Le Gal, Fleüt a-dreuz e koat, Jean Michel Veillon, Gitar, Soig Siberil ha Gilles Le Bigot, Telenn Keltieg, Janet Harbison, Violons, Pierrick Lemou.

Ar gelennerien a zo sonerien diouzh o micher. Seniñ a reont er strolladoù brudet-mañ : Gwerz, Skolvan, Barzhaz, Den, Kemia, Belfast Harp Orchestra, Hag all...

DAÑS

Digor eo ar staj d'an holl. Desket vo dañsoù meur a vroioù Breizh, met ivez istor ha firivadenn an dañsoù-se. Kaset e vo en dro ar c'hentelioù gant : Jean Barron, Alan Pierre ha Raymond Le Lann.

Titouroù hag enskrivadur :
97.86.32.08

BREURIEZH SANT ERWAN

Kamp Katekiz a vo gant Emglev an Tiegezhioù
Deiziadoù : eus ar Sul 10 a viz Gouhere d'ar Sadorn 16.
Lec'h : Skol Itron Varia e Rostren.
Evit piv ? : bugale brezhonegerien eus 7 da 13 vloaz.
Priz : 420 lur evit ur bugel, 740 evit daou, ha 960 lur evit tri.

Titour : Yann Talbot
presbital Rostrenenn 22110
Pgz. 96 29 01 55

STAJ MANAVEG

E-pad miz Eost 1994 e vo aozet daou staj berr (pemp devezh pep hini) en Enez Vanav evit deskiñ manaveg, yezh keltiek an enezenn. Dalc'het e vo an hini kentañ etre ar 1^{añ} hag ar 5 a viz Eost, hag an eil etre an 8 hag an 12 a viz Eost. Dre ar saozneg e vo graet skol, met graet e vo gant ar manaveg kement ha ma vo tu. Tregont lur saoz e kousto pep staj, 45 lur hepken an daou. Mard oc'h dedennet, skrivit da v-Brian Stowell, Murray House, Mount Havelock, Doolish/Douglas, IM1 2QF, Enez Vanav, pg. 44.624.685794.

STAJ DAÑS

Graet e vo pempvet staj dañsoù hengounel Mantallod, e Bro-Dreger, d'ar 17, 18, 19, 20 hag 21 a viz Eost. Dañsoù eus Breizh ha dañsoù eus Iwerzhon eo a vo desket e-kerzh ar staj-se, kaset en-dro gant tud eus Dastum Bro Dreger, ar gevredigezh Mod All, ha Kanfarted ar Vilin Gozh. Evit lakaat e anv e ranker skrivañ, a-raok ar 1^{añ} a viz Mezheven 1994, da gKanfarted ar Vilin Gozh, Ti-Kêr, 22450 Mantallod, pg. 96.35.89.84.

DIZOLEIÑ HOR BRO

Gant an I.R.Pa. (Institut Régional du Patrimoine) e vez aozet stajoù stummañ evit an dud o defe c'hoant dont da vezañ "heñcherien". Stajoù diwar-benn pezhioù arreburel hon ilizoù, diwar-benn mirdioù ar vro, endro naturel Breizh, ar c'hizelladurioù, ar plant, an tisavouriezh, hag all.

Gant an IRPa e vez embannet levrioù ivez, da skouer "Archéologie du Paysage", "Maisons de Site", "Arbres dans les parcs et jardins", "Gestion de la lande".
Da c'houzout hiroc'h diwar-benn ar stajoù, pe da brenañ al levrioù-se, e ranker skrivañ da IRPa, 6 rue du Chapitre, 35044 Roazhon Cedex.

BERR-HA-BERR

KEBEK

Arzourien a Vro-Gebek zo bet pedet da gemer perzh e Gouelioù Kernev ar bloaz-mañ. Etre an 18 hag ar 24 a viz Gouere e vo klevet, e Kemper, Kebekiz "Les sortilèges" ha "La grande chaîne", Skosiz "Capercaillie", Bretoned ivez evel Jacques Pellen, Gilles Servat, Lucien Gourong...

OUZH TAOL

"Ar Vretoned ouzh taol" eo dodenn an diskouezadeg vras savet gant mirdioù ar gevredigezh "buhez" (a vod mirdioù eus pemp departamant Breizh) a vo tu da welet e Gwened, e Mirdi ar C'hozh ha hed an hañv, adalek ar 24 a viz Mezheven. Frouezh daou vloavezh labour eo an diskouezadeg-se a goust 3 milion a lurioù. Goude Gwened e vo tu d'he gwelet e Sant-Brieg en nevez-amzer 95, e Montroulez en hañv 95 hag e Naoned e penn kentañ 96.



KEMENNADENN

TRO BREIZH 1994

Evit ar 14-18 bloaz : Tro-Breizh 1994 eus an 2 d'ar 6 a viz Eost, Kemper-Kastell.
Aozet eo gant Titourdi Kastell-Paol evit ar predoù hag al lojañ. Ar vrezhonegerien yaouank a c'hello ober an hent-se a-gevret : 20 km bemez, un digarez plijus da vont war roudoù ar Vretoned o deus graet an Tro Breizh a rummad da rummad e-pad kantvedoù ha kantvedoù.
Koust : 600 lur en holl. Grit bruderezh en-dro deoc'h ! Evit gouzout hiroc'h, skrivañ da : Tepot Gwilhmod presbital 29150 Kastellin 98 86 05 92/98 44 28 37.

Gouelioù

TRI GOUEL EVIT UN HAÑVEZH

Evit ar wech kentañ eo en em glevet Gouel Serr-Noz Roazhon, Gouelioù Kerne ha Gouelioù An Oriant evit sevel un teuliad a-zoare diwar-benn mont-en-dro ha roll abadennoù an emgavioù-mañ.



Tri den a oa deuet da ginnig an emglev e ti kelaouñ "Club de la Presse" Roazhon (*). Displeget oa bet gant renerien ar raktres penaos ez ae en-dro an abadennoù, penaos e oant skoazellet ha gant piv.
Budjet pep hini a zo ponner awalc'h : Kemper 7 milion, An Oriant 12 milion ha Roazhon 6 milion a lurioù gant, evit 200 000 arvester e Gouelioù Kerne, 100 000 evit Serr-Noz Roazhon, ha 380 000 evit Gouelioù Etrekeltiek An Oriant.

Fellout a ra da renerien ar Gouelioù-mañ krouñ e Breizh un emglev ledanoc'h (spi o deus kaout asant Gouel Hañv An Naoned ar bloaz a zeu - 5/10 a viz Gouere - ha re all c'hoazh... Foujera, Gwengamp...)
"Lobby" ar broioù keltiek a ya matre en-dro er bed holl ha sevenadur hor broioù a vez un atoud ekonomikel sur.

"Kaout ur sevenadur kreñv e Breizh, ansavet gant an holl, a zo un nerzh evit ekonomiezh hor rannvro", a ouzhpennas J. Bernard Vighetti. (a-zeñho war ar foto)

*Jean-Bernard Vighetti evit Serr-Noz Roazhon, Georges Schmetz evit Gouelioù Kerne ha Jean-Pierre Pichard evit Gouelioù An Oriant.

GOUEL

D'AR SADORN 01 A VIZ HERE.
Sonadeg rock keltiek ha Fest-Notz e Kommanna (29) gant EV, Anhrefn, adalek 6e noz, da zibab sonadeg ha Fest-Notz : 70 Lur, Fest-Notz : 30 lur nemetken !
Breizh war Rock - 98 78 04 61



BREIZH-UHEL

Etre an 18 hag ar 25 a viz Gouere e vo e Kez ha tro-war-dro, e kreisteiz Bro-Sant-Brieg, gouel ar gallaoueg, d'indan an anv "Assemblees Gallèses". Sonerezh, dañsoù, gallaoueg, c'hoariva, padegezh hag all, e-pad ur sizhunvezh, evit an holl. Evit gouzout hiroc'h : M.N. Mapihan, Renderrf, 22530 Kaorel.

TROIAD DENEZ PRIGENT

Miz Gouere : d'an 12 er C'hanada gant Stephan Eicher, d'ar 16 er "Francfolies" er Roc'hell (Bro-C'hall), d'an 23 e Plougastell, d'ar 24 e Nyon (Belgia) gant Stephan Eicher, d'ar 26 en Aix-les-Bains ha d'ar 27 en Arles (Okitania) gant Stephan Eicher, d'an 30 e Pont-Melvez gant Louise Ebril.
Miz Eost : d'an 2 e Kastell-Paol evit Gouel an "Tro Breizh", d'an 12 e Montréal (Kebek) evit ar "Francfolies", d'ar 14 en Alamagn evit "Festival Mitte Europa".

GOUEL SKED

Aozet e vo d'ar 25 ha d'ar 26 a viz Du 1994 Gouel SKED e Breist. Ur c'hevredad a gevredigezhioù eus Breist ha tro-dro eo SKED (war-dro 25 anezho), o fal broudañ yezh ha sevenadur Breizh.

Gouestlet e vo an devezh kentañ d'an teat e brezhoneg (evit ar vugale hag evit ar re vras), gant ar strolladoù Ar Vro Bagag, Teatr Penn ar Bed ha Strollad Plougin.
An eil devezh (d'ar Sadorn 26 a viz Du) a vo gouestlet d'ar c'hanouennoù nevez. Daou damm az aio d'ober an abadenñ :

- Goude lein : kanaouennoù nevez krouet (d.l.e. er 5 bloaz tremenet). Lakaet e vo an dud da ganañ kanaouennoù savet ganto pe gant tud all, pe traou savet o foziou dja met lakaet ur sonerezh nevez warno.

- Goude koan : fest-noz bras, gant tonioù nevez ivez, pe pozioù nevez lakaet war tonioù kozh. Embannet ha filmet e vo an abadenñ, gant ar menozh sevel ur CD hag ur film berr diwarni. Hon pal kentañ eo diskouez ez eus e Breizh ur sevenadur hag ur yezh vev. Spi zo ganeomp e vo niverus an dud, brudet pe get, o kemer perzh en abadenñ-se.

Evit kaout muioc'h a ditouroù : SKED - 9, rue du Bois d'Amour 29200 BREST - Pgz. : 98 80 26 71
Pelleiler : 98 44 36 97

Embann

SKOL WALARN II "O KLASK UN HENT"

(skrivagnerion all) gant Youenn Olier - Embannadurioù Imbourc'h (1994) -
Setu amañ eta Eil Levrenn "Skol Walarn" adembannet ha kresket kalz. Embannet e oa bet evit ar wech kentañ er bloaz 1974, (niverenn 61/1 Imbourc'h).
Al levrenn gentañ eus Skol Walarn, gouestlet penn-da-benn da Roparz Hemon, a voe embannet er bloaz 1974, (niverenn 58/1 Imbourc'h), gant an talbenn "Un Tonkad hag un Oberenn", (niverenn 247 Imbourc'h).

Spi hon eus e vo adembannet al levrenn-gentañ-se, a-benn un nebeut mizioù. Ne vo kaset avat nemet da izili Keneiled Imbourc'h a c'houlanno.
- Niverenn 290 - 60 lur an tamm - e ti Imbourc'h
8, leurgêr ar Marchiz - 56230 Kistreberrh -

CREADURIAID ASGWRN-CEFN, CYFRES ENWAU CREADURIAID A PHLANHIGION,

Embannet gant Cymdeithas Edward Llwyd 64 p. - 3 lur saoz.
N'eo ket allies e reomp anv amañ eus levrioù kembraek. Al levr 64 fajenn-mañ a vo talvoudus-bras deomp-ni brezhonegerien avat.
Levrenn gentañ un dastumad pemp levr ez eo. Kinnig a ra un anv kembraek skoueriekaet evit an holl velikeined. Re all a heulio : ar plant bleuñvus, ar preñved, an divellekined hag ar plant divleuñ.

Evel-just, evit pep loen e kaver ivez el levr an anv skiantel latin hag an anv saoznek.

Ul labour heñvel a zo da vezañ kaset da benn e brezhoneg. Tud Huon ha Perig Herbert o deus dija labourat war an anvioù laboused. A-drugarez d'al liammoù skoulmet etre TermBret, ar Greizenn Dermenadurzh evit ar Brezhoneg o labourat e framm Servij ar Brezhoneg hag ar gevredigezh kembreat e vo tu da c'hounit amzer. Kembre o tigeriñ an hent deomp, adarre.

ENORA

kanaouennoù ha rimadelloù evit ar vugale.
TES. 82 bajenn. 98 lur
Setu deuet er-maez levr kentañ Ti-embann ar Skolioù Brezhonek. Testennoù nevez savet gant mistri-skol ha kelennerien eus ar skolioù publik a vo kavet el levr. Skeudennaouet kaer eo bet al levr ha maketenn ar golo zo diouzh ar c'hentañ ivez. Ur c'hasedig a ya asambles gant al levr.
Ul labour kempenn, ur benveg kaer zo bet pourchaset deomp gant TES aze. Mall warnomp bremañ o c'hortoz ar produadurioù all da zont!

KEMENNADENN FICHENNOU-KELENN

Emañ SAV-HEOL, ar gevredigezh kentelioù-noz diazezet e Roazhon, o paouez embann ur rummad fichennou-kelenn anvet "Kregiñ gant ar brezhoneg" o vont da heul al levr-deskiñ "Ni a gomz brezhoneg", embannet ganti ivez.
Talvoudus e c'hall bezañ ar fichennou-se evit kelennerien a labour gant deraouidi ne vern o oad, gant ul levr all pe hep levr ebet, dre ma kaver enno mennozhioù diwar-benn an doare da lakaat ar skollid da gomz.
Emañ SAV-HEOL o prientiñ ivez ul levrig testennoù ha kontadennoù berr evit deraouidi a-benn miz Here.

Ar re a gelenn hag a garfe kaout ar fichennou-kelenn a rank skrivañ ha kas ur chekenn 50 lur da SAV-HEOL, 42 stradaed al Lireu, 35136 SANT JAKEZ AL LANN.

"AR BED DRE AR BREZHONEG"

gant Roparz Hemon
E-pad tremen ugent vloaz ez embannas Roparz Hemon ur gazetennig liesskrivet anvet "Ar Bed Keltiek". En Iwerzhon e oa Roparz Hemon o vevañ neuze. Meur a skrid tennet eus A.B.K. a zo bet adembannet e stumm levrioù. Hiziv e kinnig embannadurioù Hor Yezh (Pennadoù embannet e-barzh "Ar Bed Keltiek etre 1956 ha 1971") un dibab 57 pennad, hir pe hiroc'h, o

plidiñ gant a bep seurt krafoù, a dalvoudegezh hiziv evel dec'h, evit kement hini a zo prederiet gant hon dazont...

(...) "Ar Bed keltiek", eme Roparz Hemon, o tisplegañ perak en doa dibabet an anv-se d'ar gelaouenn, "ne'o ket hepken an darn eus ar bed poblet gant Kelted, hogen ivez ar bed gwelet gant daoulagad Kelted." Goude termal un tammig em eus kavet gwelloc'h reiñ un anv all d'an dastumadeg-mañ : "Ar Bed dre ar Brezhoneg".

P. D.
Mouladurioù Hor Yezh - 1, plasenn Charles Péguy - 29260 - Lesneven

LEVRIG KANAOUENNOU

Keit Vimp Bev a zo e soñj sevel ul levrig kanaouennoù dre ma fell d'ar gevredigezh broudañ an dud da ganañ asambles. El levrig-mañ e vo kavet tonioù anavezet gant an holl, brudet ma'z int bet gant kanerien 'zo. Klasket e vo plijout d'an holl, bras ha bitan.

M'ho peus c'hoant sikour ac'hanomp da gas al labour-mañ da benn.
M'ho peus er gêr skridoù (hag an ton vez, ma c'hellit), kasit un eilskrid deomp, mar plij...
Keit Vimp Bev 29520 Laz
Pgz : 98.73.80.11

AR C'HENAVEZO DIWEZHAÑ HA BARZHONEGOU ALL

Ganet eo bet Gennadi Aigi e 1934 e bro Tchouvaçh, ur republik emren eus kreiz Rusia, war ar stêr Volga. E fealded d'e vignon Pasternak en deus talvezet dezhañ bezañ lakaet da skrivagner "disent" : n'en doa ket gwir da embann e skridoù. Bremañ, avat, e c'heller lenn e skridoù en un daou-ugent vevz bennak.

Gennadi Aigi a vez sellet outañ evel barzh brasañ Bro-Rusia en amzer-vremañ.
Kinnig a ra ar skrid amañ un dibab eus e varzhonegoù bet lakaet e brezhoneg gant Koulizh Kedez, Alan Botrel, Gwendal Denez hag André Markowicz.

70 lur an tamm - gant SKRID - Mouladurioù Hor Yezh - 1, pl. Charles Péguy - 29260 - Lesneven

LEVR BOURZH BEAJ KENTAN KRISTOL GOULM

Levr-bourzh beaj kentañ Kristol Goulm, lakaet e brezhoneg gant Filip Ollio, a gomzemp diwar he fenn e niverenn diwezhañ Bremañ, zo bet embannet gant Al Liamm. 82 lur e koust al levr-se, a vo kavet ganeoc'h en holl stalioù levrioù mat.

GERIADUR RONAN AR GLEV

Deuet eo er-maez deket ha diwezhañ lodenn "Dictionnaire Classique Français-Breton" R. ar Glev e ti Al Liamm. Gant al levrenn-mañ eo peurembannet ar Geriadur bras-se, a vo ur benveg talvoudus evit an holl vrezhonegerien desket. Da 160 lur e teulo deoc'h mar prenit ur skouerenn gant ur golo kalet, ha da 125 lur mar prenit unan gant ur golo paper.

"ENEZENN AN ENVOR"

(Fañch Peru) 98 pajenn gant skeudennnoù. Rakskrid gant Diarmuid Johnson, kelenner e Skol-Veur Bonn. 55 lur gant ar mizoukas.

En e levrig diwezhañ "Enezenn an Envor" e kont Fañch Peru ur veaj bet graet gantañ ha gant e wreg Mari-Terez e-pad an hañv 1991 eus o farrez vihan a Vro-Dreger, Berched, war roudoù Brigit, Bridgid (hag ivez Padraig, Brandan...) betek Cill-Dara en Iwerzhon, dre an hentoù treuz.

Tremen a reont evel-se dre g/Corcraig, Baile, Bhuirne, Cill Airne, Ledenez An Daingean, Iniz Aran, Kontelezh Clare, ar C'honamara, Clonmacnois, Clonfert, Cill Dara, Mallow... Un digarez evit komz eus sevenadur keltiek Iwerzhon keñveriet gant hini Breizh, evit taolenniñ kaerder ar vro, daremprediñ an dud a ve enni, selaoù muzik, tañva ar bier du hag ar ragout maout hag en em zidiuñ e meur a feson.


Un daolenn ev eus Iwerzhon a-wechall hag a-vremañ.

"TAMMOU ENVORENNOU UN AMZER GRIZ"

gant Yves Miossec, embannet gant Brud Nevez. E gwerzh en holl stalioù-levrioù, pe dre lizher, hep mizou-kas, 50 L digant Mesidun, 40bis ru ar Republik, 29200 Brest (Pelg, ha Pelleiler : 98-80-49-70).
Petra ober pa vezer prizoniad brezel, nemet soñjal mont kuit ?
Setu ar pezh a raer meur a hini etre 1940 ha 1945.
Nebeut anezho a zeuas a-benn.
Setu amañ ar pezh a zo kontet el levr-mañ gant Yves Miossec.
Daoust dezhañ, ez echuo Per ar brezel en ur c'hastell-keñv, sellet plij outañ.
Yezh e gorn bro a zeu gant Yves Miossec, ur yezh aes, brav-kenañ, a blijjo d'an holl vrezhonegerien.

"MITHISTORIMA"

Teir barzhoneg kuzh
Ganet e voe Yorgos Seferis e 1900 e Smirni (Izmir bremañ e Turkia). E 1914 ez eas e diegezh da chom da Athina. Studioù war ar Gwir a reas e Pariz war-lerc'h ar brezel hag adalek 1926 e krogas da labourat evit maodiernezh an Aferioù Diavaez, betek dezhañ bezañ anvet da gannadour e Londrez (1957-1962), kent mont war e leve. Unan eus barzhez veur Hellaz eo ha roet e voe dezhañ Nobel al lennegezh e 1963. Mervel a eure e 1971.
An div varzhoneg - pe heuliadoù pezhioù, kentoc'h - kinniget amañ zo bet savet da vareoù diaes en istor Hellaz : "Mithistorima" e 1934 pa oa renet ar vro gant roueourion ha pa oa kudennoù bras gant an armerzh, gant Kiprenez hag an Dodekanisa ; "Teir Barzhoneg kuzh", unan eus e oberennoù brudetañ, e-touez ar re ziwezhañ, p'edo Yorgos Papandreou e penn ar gouarnamant (1964-65) o klask penn d'an



enkadenn bolitikel a zisoc'has, e 1967, gant "renad ar goronaled" gant SKRID - 60 lur an tamm. 80 pajenn - Mouladurioù Hor Yezh

"BREIZH-EUROPA, HISTOIRE D'UNE ASPIRATION"

gant Annaig Le Gars. Emb. IJIN, 84 p. 70 lur.
Setu al levr kentañ deuet er-maez gant IJIN. Bihan eo al levr met kalz a voued-spered a gavot ennañ. Etre teir lodenn ez eo rannet : 1. Frañs peurbadel 2. Penaos emañ an traoù en Europa ha 3. Hentoù evit Breizh.
Kalz a sifroù resis, a gartennou hag a zregantadoù a zo el levr. Ur benveg mat ez eo eta evit kas an dorzh d'ar gêr da gement jakobinour a c'helfe en em gavout war ho hent.
Souezhus ha bamus eo gwelet pegen modern ez eo Disklêriadur Kastellin bet embannet e... 1928 !
Mat eo lenn ha lakaat lenn-seurt testennoù pa fellfe da lod lakaat da grediñ ne oa nemet luskadoù faskour pe faskouridik eus emsav an etre-brezel.

Olier ar Mogn

DISKOUEZHADEG

He Yifu, livour golo al levr "Ar puñs" bet embannet c'hwec'h miz zo gant Mouladurioù Hor Yezh, a aozo un diskouezadeg, eus ar Meurzh 5 a viz Couhere betek ar Gwener 26 a viz Eost, e ti ar C.M.B., en Henbont. A orin eus Kunming, er broviñs Yunnan, bet e desteni gant Skol-Uhel an Arzou-Kaer e Beijing, ez eo He Yifu rener ar gevrenn "istorouriezh an Arzou" hag isrener ar gevrenn "Arzou Kaer" e Skol-Uhel an Arzou e Yunnan. Deuet da Bariz daou vloaz zo, pedet ma oa bet gant ur mestr kaerskriverezh, eo bet meur a wezh e Breizh o tiskouez e daolennou - e Roazhon, e Gwened - hag ocb ober stajoù, a-benn skoulmañ darempredoù startoc'h. Awenet gant temoù ha gant sturderadennoù hengourel e Sina e oar ezteurel en e livadurioù mestroniezh, kempouez ha mousfent.

Asambles gant taolennou He Yifu e c'heller arvestiñ ouzh re Zhang Yunling, livour naxi, ur bobl bihan-niver e Sina. E oberennoù, diazezet war treslunioù skritur sakr an Dongbaed, beleien dibaot-ouzh-dibaot an Naxied, zo divoutin ha dibar ken-ha-ken.
*CMB Henbont, 11 plasenn Foch - Pgz : 97 36 26 15

Ur mod nevez e Bro-Saoz AR "BRANDING"

Evit ar strolladoù diouzh ar c'hiz e Bro-Saoz hag en Amerika, a-bouez eo disheñveliañ diouzh ar gwerin, pe gant ar gwiskamant, pe gant liv ar blev, pe ar brizhelladur.

Kement-se a vez diwar c'hiz hiviziken, gant ar "branding" ("Merkañ") hag an distripadurioù. Klinikennoù eus Los Angeles hag eus San Francisco a ginnig d'o fratrikoù "pok an tan" : o zanañ gant un tamm houarn, evel gwechall- gozh ar sklaved hag hiziv ar c'hatal. Ar merk a vez graet war ar groc'hen gant ur pezh houarn, a arouez un heol, ul loen bennak, ur siffr... hag a zo tommet betek bout ruz gant ur flammer. Hervez ispisialourien an "arz korfel", ar gouleñn a va war gresk e Bro-Saoz evit al lusk-mañ. Kalzig a dud a glask hen ober a c'houleñ santadoù kreñv.



War-dro 200 den o defe pe verkou, pe gleizennou "arzel" e Bro-Saoz er mare-mañ ■

Tangi Manac'h (Diwar "The Independent")

Distripadur : scarification, brizhellañ : tatouer

Diskouezadeg

er stal "Ar Bed Keltiek", Brest, diwar-benn ar brizhellañ keltiek.

Luc'hskeudennoù diwar-benn labour an daou brizheller, Gilles eus brest ha Vincent "Alain" Gautron eus an orient.

Ar bed Keltiek, bali Clémenceau 29200 Brest - Pgz : 98 44 05 38

MIRIDIOU

Deuet ez eus ur roll eus miridioù Breizh er-maez dindan an titl "Le guide des musées de Bretagne". Dindan renerezh Jacques Briard, ur c'helenner hononiezh, eo bet savet al lev-se a renab 130 miridi, bras pe vihan, a gaver e pemp departamant Breizh. Gant an ti

Horvath eo bet embannet "Le guide des musées de Bretagne", ha 149 lur e vez gwerzhet ■

EUROSCULPTURE

Bodet e vo 200 kizeller eus ar bed a-bezh e Karaez etre an 12 hag ar 17 a viz Gouere, da labourat dirak an dud. Deuet e oa ar soñj da Batring ar Goarnig da aozañ ur seurt "gouel ar c'hizellañ" e kreiz Breizh, evit lidañ an arz-se. Dibabaet ez eus 200 kizeller, o tont eus 30 bro, a douez tremen 400 den o doa choant kemer perzh er gouel-se, a raio eus Karaez kêrbenn bed ar gizellerien e-pad un nebeut devezhiou ■

EIL GOUEL ETREVROADEL AR C'HIZELLEREZH WAR GREUN-VAEN

Eil Gouel Etrevroadel ar c'hizellerezh war greun-vaen a vo dalc'het etre ar 1añ hag an 31 a viz Gouere e Lannelen (35). 12 kizeller a-vec'h a vo o labourat dirazoc'h a-hed ar miz : 150 tonenn greun-vaen kizellet en ur miziad. Ur bed souezhus, strobiniellus eo bed ar greun-vaen. Deoc'h da vont da zizoleiñ ar bed-mañ war hent ar piker-mañ ! Diskouezadeg etre 9e mintin ha 7e noz. Abadennoù noz bep 2 zevvezh... (Etre Dol ha Combourg). Titour bemdez e ti-kêr Lannelen (Lanhelin) : 99 73 16 93.

UR GREIZENN DUDI EN ORIENT ?

Fellout a ra da dud Emglev Bro an Orient kinnig da vugale ar c'horn-brose ur greizenn dudi e brezhoneg, ul lec'h evit oberezhioù e brezhoneg da verc'her hag e-pad ar vakañsoù skol. E kenlabour gant ar gevredigezh "Dudi", a ra war-dro hevelep kreizennoù e Sant Brieg hag e Roazhon, e fell dezho lakaat digeriñ unan en Orient en diskar-amzer ■

DISKOULMOU AR GAEL 16

A-led : I-Keheder ; an. II-Oz ; dinaske. III-Eost ; tev. IV-Bri ; kalede. V-Randoner. VI-Ec'h ; Ruiz ; ha. VII-Nouel ; arem. VIII-Raz ; moneiz. IX-Anao ; aze. X-Diskaras.

A-serzh : 1-Koabrennad. 2-Ez ; rac'hoani. 3-Ein ; uzas. 4-Edo ; dre ; ok. 5-Diskoulm. 6-Entani ; oar. 7-Ra ; lezan. 8-Ster ; reas. 9-Aked ; heiz. 10-Nevezamer.

GERIOU-KROAZ gant Mich BEYER

Gael niv.17

Grid for a 20x20 crossword puzzle. The grid contains black squares indicating non-letter positions. The letters G, A, E, L are placed in the top row of the grid.

- A-led
1) Kreskiñ a ra war ar mogenoù ; trellet
2) Rakger : abimez ; ur goue di-hour o lastum viou en dazont
3) Loen : Ennañ e vez sermet ar boued-chatal ; pep skoli-veur he deus hoc'h hin ; eus lenn
4) Da dithout ar gwenn hen gra ; brasoc'h e c'hopr eget hoc'h hin ; sur !
5) Penton ; war ar skorn hen graer ; eus bezah ; traec'henn
6) Gwrmen ; dre heg e peuras ; danvez holen ; ragav
7) Sant Iregennad ; pa n'e gell archedañ ; en da ; drog a rant
8) Breinañ a reont hantenoù Pasqua ; ouzbeñ ar gwalc'h ; evelte e pli ar chaot d'an Alamanned
9) Talet en aod ; ret d'ar vuhez ; e-barzh an ; enebour Karl ha Friedrich
10) Gae : diskouezh ; gwanz war-gil
11) Gwalenn an trede bed ; k'hañvad kanet er Barzhaz Breizh ; otus
12) A zehou da glez e vez lennet ; warno e sav ar c'hilhegi ; rakger evit un eiler ; rakger
13) Ode : strollad gall ; atom dactunieret ; digompac eo hin al loar
14) Da stagañ ; ne bijn ket da Jolly Jumper ; c'hoariva japanat
15) E donder ho kalon ; bale bro ; ur gartenn en devez a-wechou
16) Nezevez ampart ; kened a laka en ho pubez ; ger ostlamm
17) Degas ; k'rañ an Huguenod ; aze oa an dalc'h evit Hamlet ; e-keit
18) Div c'hoar o echuñ un abaden ; lenn en tu all d'ar mor ; e di a livo evelte ; enni e veze ebatou ; diad
19) Labour ; koad ha kerdin evit Marzhin ; rakger ; enni e sav toueggi Jakez Riou
20) Hent an dour er gegn ; repu ar c'honikled ; berveg labour ar gevredenn

- A-serzh
1) Koel tonm ; beziad fets pe difets ; sonn
2) Da vont tre er park ; en ar ; s'ar ; itall ; plaenae ; ler ar faroced a rouze
3) Skol-veur ; kerdienne kalvario
4) Bouchou bihan ; war rod an avelloù
5) Urzh da vont brokis ; pezh d'riad ; plaver
6) Frouezh ; pa rae to hen grae ; (a) raio evel al laouenan ; hent war an tu gin
7) Lennienoù an dazont ; luc'hed
8) Aragenn ha gem-mell ; kenedus ; kammed war-gil ; evelte e rae ar giez
9) Pezhed meur a goublad lenneg ; penn-avel
10) Dazaon e-barzh an ; aragenn displeget
11) Labourenen an haf ; pa n'e gra gario ; e-penn ho ragav
12) Tri evit ar preñt met pevat evit ar c'horf ; eno e veve ur strobinieller brudet ; menoz ; c'haridi
13) Danvez bouchou bihan ; n'eo ket nebeud ; houman a lard goulaouennou-koar
14) Vicharinen divasalek ; enno e tremen ar bair ; boerig gloc'h
15) Kent ar yar pe war he lerc'h ? Eus noziñ ; pinvidigezh ar gwazi ; poullenn ; notenn
16) Bouchou bihan ; Bouradenn ; disoc'h
17) Da wiskat d'eviter ; en da ; diwall a reont ouzhi dorioù ho hez
18) Slum ; touz ; ran ; distaget gant ar c'hourennen
19) War ken ar gwagenn ; re Loez ; Chariz ha Franaez a respasmas hor frankiz ; eus gouzod ; a veze graet e Kêr-Ye
20) Niver brudet e Jossalin ; gaez buan a-raok ar studaden ?

TAOLENN

BREMAN NIV. 154/155

miz Gouere/Eost 94 - 36 pajenn

Table listing page numbers for various sections: Lizhiri (2), Manifestadeg (3), SAB ha radio (4-5), Berr ha berr (5), Diennadegoù Europa (6-7), Europa (8), Breudou Pondivi (9), Studiaden Insee (10-11), Endro en Naoned (13), Taolioù-pluenn (14), Raktres Pasqua (16-17), Euskadi (18-19), Edmond Simeoni (20), Armoù nevez (21), Etrevroadel (22-23), Korsika (24), Sevenadur (25-36)

Pennadoù gant Iwan Kadored, H. Kerran, Olier Ar Mogn, Yann Varc'h Thorel, Lena Louarn, A.V.C., M.Kerran., Paskal ar Marc'heg, R. Baxter, G.Cabon, Harri, P. Lanoe, Serj Huede, Tangi Manac'h, Miche Beyer, Tangi Louar, Michel Nicolas, Benead Lukian, Filip Ollio, Kristian ar Braz.

Koazell difaziñ gant O. Ar Mogn.

Luc'hskeudennoù gant L. Louarn, O.F., N. Enjelin, JM Roynard, K.A.D., Hubert Thouvenin.

Koazell bizkriñ gant D. Gratiat.

Maketenniñ gant Lena Louarn.

Ti moulevezh Heklev

Renerez Bremañ : Lena Louarn

Skrivit e-barzh Bremañ ! Kasit ho pennadoù, gae skeudennoù, dreist-holl ! war baper, pe gwelloc'h pladennig a-raok an 28 a viz Eost Trugarez deoc'h.


Koumanant : 200 lur ar bloaz, skouadenn : adalek 250 lur ar bloaz.

BREMAÑ, 8 ru Hoche,

35000 Roazhon, Breizh

Niverenn CPPAP 62974

An Tai Ji Quan e Breizh



Herve Gerard a vez o
keleñn an Tai Ji Quan
e Roazhon hag e
S.Brieg. Diskibl ur
mestr ezel eus ar familh
Yang, ez eo abaoe
ouzhpenn dek vloaz
bremañ e
oberiantiz pennañ.

Gant an Tai Ji Quan e adkaver luskoù a veze graet gant hon tadoù hag a zo emsavus evit ar c'horf hag e tizoloer en-dro e c'halloudusted hag e dalvoudegezh. Diouzh un tu all e oa tost-tre doare prederiañ Hensinaiz ouzh hini an Hengelted, evel m'eo tost an Yin-Yang ouzh an Triskin. Diazez an Tai Ji a c'hell bezañ dielfennet evel-henn : daou ahel o liammañ pep hini teir fennaenn, ar c'harrez (an diazez) - ar groaz (ar fram) - ar c'helc'h (ar fiñv, an emdreiñ) diouzh un tu, an anal - ar c'hreiz - an troellennoù diouzh un tu all. Kement-se zo ivez er groaz kelt.

Bremañ : *Petra eo an Tai Ji Quan ?*

H. Gerard : Un harz-brezeliñ a Sina eo. Tenn a ra d'an Ai Ki Do, met gorrek-tre eo al luskoù. Kalz a dud a weler e Sina o sevel mintin abred hag o vont da embregiñ war ar straedoù, el liorzhoù, e porzhioù an azeuldioù...

Br. : *Petra a c'hell bezañ orin an arz-brezeliñ-se ?*

H.G. : Milvedoù zo e oa endeo un embregerezh-korf taour a oa e bal aezañ unvaniezh ar venec'h gant an Dao, an Yin-Yang. Merzet o doa, o sellet ouzh stourmoù etre evned ha naeron, e oa gwell bezañ ouesk eget bezañ kreñv. Goude-se e voe diorroet gant ar c'hlann Chen o lakaat ar pouez war kengloterezh ar c'helc'hioù, an troadelloù. Brudet e voe warlec'h gant ar c'hlann Yang, Yang Chenfu o vezañ bet an tad-saver e-kreiz an triwec'hvet kantved.

Br. : *Pe ziforc'h zo etre "arz-brezeliñ" ha "sport-emgann" ?*

H.G. : Dispar eo an Tai Ji Quan evit gwellaat an analiñ, hag alese evit

an emzifenn. Savet, frammet e vez ar c'horf eus an diavaez d'an diabarzh a-drugarez da gefluskoù a ro tu d'an energiezh da c'halloudusaat. Ur stourm ouzh an-unan eo da gentañ ha n'eo ket ouzh un den all : dav eo meizañ ar feulster a zo en unan evit, neket e vestroniañ, e zistrujañ pe e ezteurel, met evit e hentañ hag e dreuzfurmañ en diabarzh. En eneb ez eus eus ar sportoù-emgann doareoù da ezteurel feulster a-benn stourm ouzh un enebour diavaez. Emañ an diforc'h etre galloud en energiezh ha nerzh ar c'higennoù.

Br. : *Diazezet eo bet an Tai Ji Quan gant Hensinaiz; pe dalvoudegezh a ve da Vreizhiz a-vremañ embregiñ Tai Ji Quan ?*

H.G. : Gwir ez eus un diforc'h marevezh hag un diforc'h rannved. Ur vuhez dilusk a rener hiziv : al lod brasañ eus an dud a ya eus o gwele d'o c'hador ouzh taol, eus o c'hador da azezenn o c'harr da gador o burev...

Br. : *Pet a dud a vez oc'h embregiñ e Breizh ?*

H.G. : Diaes eo gouzout resis rak embregiñ a c'heller ober ur wezh ho peus graet an dro d'an diazezoù, ha meur a gevredad zo ivez. E-tro 400-500 den omp e Breizh d'am mennozh. N'eus ket a genstrivadegoù, na lec'hel na broadel, setu ez eo diaes en em anavezout an eil re ar re all, ha bezañ anavezet gant al lod brasañ eus an dud.

Br. : *Pegement e koust d'an nen deskiñ embregiñ Tai Ji ?*

H.G. : N'eus ket a zafar pe a bezhioù-dilhad a-ratozh evit embregiñ. N'eus ken met an enskrivadur a goust etre 1000 ha 1500 lur ar bloavezh. ■

Evit kaout titour

**Ti an Tai Ji Quan,
175 bali Patton 35700
Roazhon - Pgz. 99 63 58 57.**